



Kamp Etrekeltiek Ar Vrezhonegerion

Rostrenen (29 gouere - 14 eost 1965)

Kenteliou ar Rummad Uhel gant

GWENAEL MAZE RONAN AR GLEW ERWAN

GWEGEN MARI ELEN MAZE GOULVEN

PENNAOD LOEIZ LEMOINE IVONA KONAN

kelennerion Strollad an Deskadurezh Eil Derez

PREDER

Kaier 66
Kerzu 1964

Kamp Etrekeltiek Ar Vrezhonegerion

Rostrenen (29 gouere - 14 eost 1965)

Kenteliou ar Rummad Uhel gant

GWENAEL MAZE RONAN AR GLEW ERWAN

GWEGEN MARI ELEN MAZE GOULVEN

PENNAOD LOEIZ LEMOINE IVONA KONAN

kelennerion Strollad an Deskadurezh Eil Derezh

PRE DER

Kaier 66

Kerzu 1964

K I N N I G

N'ouzon ket hag eñ eo bet fur Abanna o c'houlenn diganin kinnig an niverenn-mañ : risklus a-walc'h eo d'ur vamm komz diwar-benn bugale aet pell diouti oc'h heuliañ un hent tenn ha klodus. Al lorc'h a ya enni, ha techet eo da ganañ meuleudi dezho betek re. Met, daoust hag eñ n'eo ket reizh kanañ meuleudi d'ar re a stourm korf hag ene evit ar vro ?

o o

Ha gouzout a ouieomp e 1948, p'hon eus savet Kamp kentañ ar Vrezhonegerien, Langleiz, Ronan Huon ha me, he defe hor c'hevredigezh tizhet an niver a dud bodet en-dro dezhi bre-mañ, hag an derez uhel ma'z eo deut warni ? Ar rakverzaad-se a oa koulskoude ennomp, panevet-se n'hon defe ket kroget.

Bremañ, p'emaomp'gant an trec'h, e tleomp trugarekaat ar re o deus hor skoazellet evit hadañ an erv boulc'het ganeomp trivec'h bloaz 'zo.

Hor menoz pennañ a oa reiñ tro d'ar vrezhonegerien d'en em anavezout ha da wellaat o yezh en un aergelc'h breizhat-rik. Tizhet ar pal-se ganeomp. Ha tamm ha tamm e voe uhelaet derez ar c'hentelioù hag ar prezegennoù roet e - doug hor c'hampoù. Emaomp e 1965 na petra 'ta! Perak chom war-lerc'h pa vez anv en-dro deomp eus skiantoù, lennegezh uhel etrevroadel, hag anaoudegezh eus ar bed a-bezh, pa n'eo ket eus an ec'honder.

C K.E.A.V. evit an holl gentelioù, war un dro gant hec'h aozer evit pep hini anezho, eleze : G. MAZE, R. LE GLEAU, Y. GUEGUEN, M.E. MAZE, G. PINAULT, L. LEMOINE, I. KONAN.

Tremenet eo pell 'zo mare Salaun ar Foll hag ar frazenn vrezhonek nemet a zeue gantañ : "Salaun a zebrfe bara."
 Muic'h eget bara hon eus ezhomm evit saveteiñ Breizh. Uhelvennadoù hor spered broadel hon eus da vagañ, ha se ne c'hell bezañ sevenet nemet en hor yezh.
 Hanter-kant vloaz'zo ne veze arveret ar brezhoneg, koulz lavaret nemet evit kanañ kaerderioù ar barrez ha melkoni brogarourien harluet. Lennegezh diouzh ar c'hiz, dister pe damuhel, hogen lennegezh hepken.

Pa zigoras Gwalarn hor prenestr war ar bed e c'hwezhas avelioù dianav betek-hen e Breizh, a lakaas bleunioù nevez da ziwanañ ha diwarno gounidoù espar.

Lavaret ez eus bet a-zivout ar c'hantved-mañ :
 - En hanterenn gentañ anezhañ eo bet graet dizoloadennoù brasañ skiantoù ar bed. En eilvet hanterenn e vez degaset an dizoloadennoù-se d'ar bobl.-
 Treitourien e vefemp ouzh Breizhiz ma ne degasfemp ket an dizoloadennoù-se dezho. En o yezh.

S.A.D.E.D. an hini eo en deus kemeret ar garg-se, hag anaoudek-kenañ omp ouzh e renerezh da vezañ asantet ober war-dro ar rummad kentelioù uhel evit an dibab brezhonegerien a zeu bep bloaz d'hor skolioù-hañv.

Niverus-tre eo bet ar skolidi er rummad kentelioù-se e kamp Rostrenen. Ar re niverusañ deizioù alies, hag ar skolidi-se tud yaouank dreist-holl. Pezh a ziskouez splann e fell d'ar Vretoned diorroet ledanaat o deskadurezh dre o yezh, arouez o broadelezh.

Hag o vezañ n'eo ar gudenn bolitikel nemet un astenn eus ar gudenn hiniennel, e c'hell'o hiviziken yaouankiz Vreizh lakaat da dalvezout lavarenn Padraig Pearse : "Strivet em eus evit sevel va spered ha va ene uheloc'h eget re mistri va fobl."

Vefa de Bellaing

1.10.1965

K E N T N O T E N N O U

gant Gwazva ar C'helenn

S . A . D . E . D .

1. Roll ar c'hentelioù displeget e Rostrenen da gafver
KAMP ETREKELTIEK AR VREZHONEGERION - Rummad Uhel
e kefridi kelennerion S.A.D.E.D.

- 30 07 65 LENNEGEZH. Gwion ar Menteg : "Y.V. Heneu".
- 31 07 65 KRENNVREZHONEG. Ronan Jolaie : "Buhez Mab-dan"
- 02 08 65 LENNEGEZH. Youenn Olier : "Loeiz Herrieu"
- *03 08 65 ATOMOURIEZH. Gwenael Maze : "Framm an Atomenn"
- *04 08 65 YEZHADUR. Ronan ar Glew : "Ar Sujañ e Brezhoneg"
- *05 08 65 LENNEGEZH. Erwan Gweqen : "Roparz Hemon : An Tri Boulomig Kalon Acour"
- *06 08 65 ISTDOR. Mari-Elen Maze : "An Emsav Kentañ : Spered ar Vro, Brug"
- 07 08 65 ISTDOR. Youenn Olier : "An Emsav Kentañ : Brittia"
- *09 08 65 KERNEVEG. Goulven Pennaod : "Sylvester ha'n dhragon"
- 10 08 65 GWERINONIEZH. Gwennole ar Menn : "Petra eo ar Werinoniez ?"
- 11 08 65 JEDONIEZH. Abanna : "Diazezoù ar Jedoniez"
- *12 08 65 PREDEROURIEZH. Loeiz Lemoine : "Keal an Istorelezh"
- *13 08 65 LENNEGEZH. Ivona Konan : "Klerg : An Eostig-Bailh"
- 14 08 65 ISTDOR. Youenn Olier : "An Eil Emsav : Galv"

Ar c'hentelioù merket * eo ar re a gaver embannet er c'haier-mañ.

Ar c'hentelioù all a vo embannet e lec'h all, pe, war c'houlenn o aozerion, adteuzet evit ober pennadoù hiroc'h.

2. Kentañ dlead kelennerion Strollad an Deskadurezh Eil Derezh eo trugarekaat Renerezh Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerion evit an degemer dellezek a voe graet dezho e Kamp Rostrenen. Enoret int bet, e-keñver ar pezh ez int marteze, hogen dreist-holl diouzh ar pal o deus kemeret : brasoc'h bri ne c'helle bezañ douget dezho.

Diouzh o zu o deus lakaet o foan evit reiñ da skolidi ar C'hamp ar pup gwellañ eus o gouiziegezh. Pleustret o deus, war an dachenn fiziet enno, da seveniñ unan eus palioù K.E.A.V. : bezañ ur greizenn a studi.

Skolidi ar Rummad Uhel zo ivez da vezañ trugarekaet kalonok. O niver, - 41 a voe anezho, en darnvuiañ o vezañ hauliet ar Rummad a-bezh - o evezhdad, an aked o devoe da ober ar poslladennoù pemdeziek zo a-dra-sur gwellañ gopr o c'helennerion.

3. An trede bloaz eo ez a kelennerion S.A.D.E.D. da genlabourat gant K.E.A.V. Teolioù-arnod e voe kentoc'h avat o labour e Kampoù Langonned ha Lokronan-Leon. Bennoz dezho e c'hallas Rummad Uhel Kamp Rostrenen bezañ prienteet pervezh ha sevenet en e holl vunudoù.

Un tamm dishañvel e vez ar c'helenneriezh en ur c'hamp hag en ur skol dre lizher. Mar deo ar genurzh perzh kentañ ar skol dre lizher, ar gengrad eo a rank ren war ur c'hamp studi. Ha seul vrasoc'h kengrad pa vez ar gelenn-erion dileuridi a-bezh un sozadur all. Setu perak e talvez ar boan lavarout ez eas en-dre kenlabour kelennerion S.A.D.E.D. ha renerion K.E.A.V. hep na deuas an disterañ koulenn war ar gengrad, nag an disterañ skoilh ar genurzh.

4. An trec'h brasañ avat eo hemañ : dirazzet eo diwar vremañ al live hollvedel gant ar gelennadurezh vrezhon. Ouzhpenn bezañ un doare da ziwall ar stuzegezh vrezhon, ouzhpenn bezañ un hent davit ar sevenadur, ez eo deuet da vezañ un hent gou ar sevenadur. Ar c'hentelioù embannet ex c'haier-mañ, ha pa vije anezho hepmuiken, hann diskouez anat.

1. Ur gelennadurezh ouiziel ez eus e Brezhoneg. Ar gouiziad, forzh pehini

e ve e gevrenn, atomouriezh, yezhouriezh, bevoniezh, jedoniezh, bredoniezh, a gavo en hor yezh binvioù-labour ha -kelenn dispar ha dreist-holl an doare da sevel reoù nevez diouzh e ezhammoù.

2. Ur gelennadurezh prederouriel zo o paouez diwanañ. Dre hanter-kent vloaz emgann evit adsevel Breizh en he broadalezh, dre ar stourm kriz ouzh an estrenaat, ez eus bet ganet un den brezhon dilos ha sanket mat e wrizioù e douar e vro. E breder a gemer lsc'h e-kichen preder ar bobloù all. Digor eo ar c'hendiviz etre ar preder brezhon hag ar preder gresian, ar preder alaman, ar preder gall...

3. Ur gelennadurezh war an Istor ha war al Lennegzh a laka ar Vrezhonad yaouank da berc'hanned war o glad : 1 500 bloavezhad Istor, 500 bloavezhad Lennegzh; da c'hounit ur stummadur hiniennel, keodedel ha denel par dre e fuzm d'ar stummadurioù diorreetañ, dizicuerus dre e zanvez pa'z eus anezhañ ur stummadur brezhon.

Gwazva ar C'helenn
Strollad an Deskadurezh Eil Derezh.

Dimeurzh 3 eost

A T O M O U R I E Z H

G w e n a e l M A Z E

F R A M M A N A T O M E N N

1. Keal an atomenn.

Kozh kenan eo keal an atomenn. Demokrites hag Aristoteles, da skouer, a lavars e c'hoarveze an danvez eus elfennoù diskejus, eleze eus atom. "An ec'honder, eme zDemokrites, zo ur redenn atom skilfek; el lec'h ma vez atomennoù kengrapet e vez danvez."

An holl n'edont ket a-du gant ar gweladur-se. Lavarout a ra Spinoza e "Diazezoù Prederouriezh Descartes" : "Diskejus eo an atomenn dre lakadur, hogen genezh an danvez a c'hoarvez eus al ledegezh, a zo rannadus dre natur, eleze n'eus ket eus an atomennoù pe eus parzhioù dirannadus en danvez."

Diazezet e voe en un doare gouiziel keal an atomenn gant ar Saoz Dalton e 1803. Da heul arnodoù diniver e tisplegas ar savelenn-mañ :

Kemeromp daou gorf A ha B a c'hall kediañ o kenderc'hañ daou gediad pe ouzhpenn. Kenfeur an tolzoù eus ar c'horf A a c'hall kediañ ouzh an un tolz eus ar c'horf B zo seun (ha kendalc'hel ne vern pe dolz eus B a zo bet dibabet).

Kemeromp, da skouer, 56 g houarn. Kediañ a c'hall ober ouzh $m_1 = 76$ g klor o c'heneh kloridenn houarnus; heñveldra e kedio ouzh $m_2 = 106,5$ g klor evit genel kloridenn houarnek. Kenfeur an tolzoù klor m_1 ha m_2 zo :

$$\frac{m_1}{m_2} = \frac{76}{106,5} = \frac{2}{3}.$$

Mar deo frammet an danvez gant atomeñoù eo anat saveleñ Dalton. Evit ar skouer hon eus kemeret :

kediañ a ra 2 x atomeñ Cl (tolz m_1) ouzh y atomeñ Fe evit genel Cl_2Fe ,

kediañ a ra 3 x atomeñ Cl (tolz m_2) ouzh y atomeñ Fe evit genel Cl_3Fe .

Kenfeur an tolzoù klor zo :

$$\frac{m_1}{m_2} = \frac{2x \times m}{3x \times m} = \frac{2}{3}.$$

(m = tolz un atomeñ glor).

Goulakadenn Avogadro ha saveleñ Avogadro-Ampère displeget nebeut goude o deus diskouezet pegen pleustrek e oa keal an atomeñ hag ar volekulenn.

Ec'honadoù par a aezhenoù disheñvel, diouzh doareoù heñvel a wrezverk hag a wask, a vez enno an un niver a volekul. Mol ur c'horf aezhel diforzh zo dezhañ an un ec'honad V diouzh doareoù heñvel a wrezverk hag a wask. An ec'honad V zo 22,4 l diouzh doareoù reel (0°C, 76 cm Hg). An ec'honad-mol eo.

Un hentenn hon eus bremañ evit jediñ tolz mol un aezhenn. Douester d un aezhenn a dermener evel-henn :

$$d = \frac{\text{tolz an ec'honad aezhenn V}}{\text{tolz an ec'honad aer V}} = \frac{M}{M'}$$

Tolz-mol an aer zo $M'_O = 1,3 \times 22,4 = 29$ g. Eleze

tolz-mol M'_O an aezhenn zo :

$$M'_O = 29 d.$$

(Ur mol a c'hoarvez eus $2 \times 6,023 \times 10^{23}$ atomeñ.)

2. Ar Rummadur Trovezhel.

E-pad pell, an holl arnodoù kaset da benn n'o deus degaset sklerijenn ebet war natur an atomeñoù. Evit ar gimourion e oa an atomeñ ur rannig elfennel diskejus, kendalc'hel he zolz ne vern pe e kediañ e ve kavet.

Gwelet e oa bet abaoe pell o doa ar c'horfoù eeun perzhioù tost an eil re ouzh ar re all, ha meur a gefredour a glaskas o urzhiañ en un doare reizh ha pleustrek. Rannet e voe abred a-walc'h ar c'horfoù eeun e daou rumm : ar metaloù hag an divetaloù diouzh ma ked an oksidenoù anezho ouzh an dour evit genel hidrosidenoù pe get. Meur a urzhiadur all a voe kinniget hep kaout dazont ebet.

E 1869 e kinnige Mendeleev un daolenn glok eus an holl gorf-où eeun anavezet en e amzer (hag ivez eus lod a voe dizoloet goude) urzhiet diouzh o ferzhioù kimiek ha diouzh o zolzoù Had-atom. E 1870 e kinnige Meyer un daolenn tost heñvel. Anvet e vez an daolenn-se Rummadur Trovezhel an Elfenoù. Reif a reas da soñjal e oa reoliek frammadur diabarzh an atomeñoù hogen ret e voe gortoz derou an 20th kantved evit henn anataat.

D'an ampoent zoken, ne oa ket anat d'an holl e oa eus an atomeñ. Evit kalz ne glote keal an atomeñ gant devoud ebet, - ne oa nemet un hentenn aes evit jediñ ha rakwelout an dasgveredoù kimiek, levezoniet ma oant gant saveleñoù Fourier ha Maxwell war ar goulou hag ar gwagennoù tredanwarellek dre vras.

Boas e vezer da daolennañ ar Rummadur Trovezhel evel-henn :

RUMMADUR TROVEZHHEL AN ELFENNOU KIMIEK PE TAOLENN VAENDELEDEV


T	I	II	III	IV	V	VI	VII	VIII	0
1	1 H								2 He
2	3 Li	4 Be	5 B	6 C	7 N	8 O	9 F		10 Ne
3	11 Na	12 Mg	13 Al	14 Si	15 P	16 S	17 Cl		18 A
4	19 K	20 Ca	21 Sc	22 Ti	23 V	24 Cr	25 Mn	26 Fe 27 Co 28 Ni	
	29 Cu	30 Zn	31 Ga	32 Ge	33 As	34 Se	35 Br		36 Kr
5	37 Rb	38 Sr	39 Y	40 Zr	41 Nb	42 Mo	43 Tc	44 Ru 45 Rh 46 Pd	
	47 Ag	48 Cd	49 In	50 Sn	51 Sb	52 Te	53 I		54 Xe
6	55 Cs	56 Ba	57-71	72 Hf	73 Ta	74 W	75 Re	76 Os 77 Ir 78 Pt	
	79 Au	80 Hg	81 Tl	82 Pb	83 Bi	84 Po	85 At		86 Rn
7	87 Fr	88 Ra	89 Ac	90 Th	91 Pa	92 U ...			

(Pep elfenn a vez meneged dre he niverenn er Rummadur Trovezhel hag hac'h aronez. Er bann kentañ e kaver niverennoù an Trovezhioù.)

3. Atomenn J.J.Thomson.


1. An Elekttron.

E-ser studiañ ar bannoù X ganet en ur glogorenn gCrookes e tizolo Jean Perrin ez eo ar bannoù maezode rannigoù maes-vec'hiet. D'e houll, J.J.Thomson o studiañ bannoù maezode ganet diwar vaezodoù a bep seurt danvezioù a laka anat ez eo kendalc'hel ar c'heñver $\frac{e}{m}$ (bec'nder tolzel) o tez-verkañ pep hini; eleze, ez eo an hevelep rannigoù a ya d'ober an holl vannoù maezode.



Klogorenn gCrookes

Setu penaos e vuzuilh J.J.Thomson ar c'heñver $\frac{e}{m}$: lakaat a ra ar bannoù maezode da dremen en ur vaezienn dredanek ha gwarellec a hed h , an tredanvaeziad hag ar gwarellvaeziad o vezañ gindru e pep poent.



Dastum a ra ar rannigoù war ur skramm.

Gwerediñ a ra un nerzh $F = e(E + v \times B)$ war ar rannig; dihentet e vez eta. Tekañ a ra ar skramm er poent $P(x,y)$. Jediñ a c'haller daveennoù P :

$$x = \frac{e}{m} \frac{1}{v} E h H \qquad y = \frac{e}{m} \frac{1}{v^2} E h H$$

Dre dennañ v eus an daou atalad e tisoc'her gant :


$$y = x^2 \frac{e}{m} \frac{B^2}{E} h H$$

a zo atalad ur baraboleenn. Da lavarout eo o deus ar rannigoù strobet war un hevelep parabolenn an un bec'hder tolzel $\frac{m}{e}$. Ar rannigoù a ya d'ober ar bannoù maezode a voe anvet elektron gant J.J.Thomson. Bec'hiad un elektronenn zo $-1,602 \cdot 10^{-19}$ C. Tolz un elektronenn zo $m_0 = 9,107 \cdot 10^{-31}$ kg.

2. An atomenn.

O studiañ gwered ar strinkennoù war ar bannoù X hag o vuzuliañ al luc'had (kementad luc'h) dihentet diouzh roudoù 'zo, e

pellenn vuivec'hiet



elektron

Atomenn J.J.Thomson

kinnigas J.J.Thomson ar skeudenn-mañ. En atomenn ez eus elektron maesvec'hiet. O kouezhañ warno e laka ar bann X, evel kement gwagenn dredanwarellek, an elektron da luskellat. Kement bec'hiad o luskellat a c'han ur wagenn dredanwarellek a skin a bep tu en-dro dezhañ.

En doare-se eo deuet J.J.Thomson a-benn da lavarout pet elektronenn a zo en elfennoù ar Rummadur Trovezhel.

Evit displegañ e van an elektron gronnet hep bezañ diframmet (evel e tlefed gortoz hervez Savelenn Coulomb), evit displegañ ivez manvec'hded an atomenn ec'h arlakae J.J.Thomson e oa en-dro


d'ar gronnad elektron oc'h ober pep atomenn ur "belenn" vuivec'hiet.

4. Atomenn Rutheford.

An atomenn a c'hoarvez eus ur graonell vuivec'hiet, an derc'han, hag eus strobadoù rannigoù maesvec'hiet, an elektron. Da skouer, an atomenn hidrogen a c'hoarvez eus un elektronenn hag un derc'han vuivec'hiet (+ e).

Kement-mañ a voe lakaet anat gant Rutheford e 1912 pa vannas rannigoù α ouzh ur bladenn vetal. An darn vrasañ eus ar rannigoù a dreuze ar metal evel ma treuzont an danvezioù all, hogen ul lod bihan a veze dihentet. Ur rannig α a vez dihentet a-serzh pa vannar 15 000 all. Jediñ a reas Rutheford oc'h arlakaat e oa tredanel an nerzh a werede ouzh ar rannig (eleze e oa un dra bennak vuivec'hiet e diabarzh an atomenn) a-benn gouzout pegen tost d'ar greizenn vuivec'hiet-se e tlee ar rannigoù tremen evit bezañ dihentet a-serzh.

Kemeromp, da skouer, ur rannig α bannet gant an tizh $2,09 \times 10^9$ cm/s; lakaomp ez eo 100 e bec'hiad ar greizenn vuivec'hiet; lakaomp, en diwezh, e talvez atalad Coulomb en degouezh-mañ :




Taol-arnod Rutheford

$$F = \frac{m m'}{d^2} \frac{1}{4 \pi \epsilon_0} \quad (m = -e, m' = 100 e)$$

Jediñ a reer e c'halle ar rannig bezañ dihentet mar tremen da nebeutoc'h eget $3,4 \cdot 10^{-12}$ cm diouzh ar greizenn. Fañsal, ment an atomenn jedet evit aezhennoù ha strinkennoù zo e feur 10^{-8} cm.

Kement-se a roas da soñjal e oa goull pe dost an atomenn. Sk. ar bajenn a-raok a lugh dihentadur ar rannig α diouzh an hed a zo etre ar greizenn hag he roud.



Atomenn Rutheford

niverenn an elfenn er Rummadur Trovezhel.

5. Atomenn vBohr.

Ar skeudenn ginniget gant Rutheford evit displegañ perzhioù an atomenn ne c'halle ket klotañ gant saveleñnoù Maxwell, o vezañ ma c'han kement bec'hiad o fiñval skinoù tredanwarellek. Padal, an atomenn dizalc'h (eleze nann heskinet gant gwagennoù tredanwarellek pe teket gant rannigoù α , h.a.) da 0°K ne skin ket gremm.

Arlakaat a ra Bohr neuze ne da ket an elektron hervez saveleñnoù Maxwell met hervez saveleñn ar pementadoù a lavar ez eo pementadek an eskemmoù gremm etre ar bannoù tredanwarellek hag an danvez. Da skouer, mar bez skinet gremm gant un atomenn, e vez skinet da nebeutañ ur pementad gremm.

Kement elektronenn a zo war ur roud stabil ne skin tamm gremm ebet. E keveskemm e c'haller lavarout : kement elektronenn

na skin ket gremm zo-war ur roud stabil.

An elektron a c'hall tremen avat eus ur roud stabil d'ur roud all dindan ur gwered pe un all. Mar kouezh un elektronenn (eleze mar testa ouzh an derc'han) e skin gwagennoù tredanwarellek a dalm ν . Evit an hidrogen :

$$\nu = \frac{W_m - W_n}{h} = \frac{2\pi^2 m e^4}{h^2} \left(\frac{1}{m^2} - \frac{1}{n^2} \right)$$

W_n = barr ar gwiskad n (n = 1, 2, 3...)

W_m = barr ar gwiskad m ma kouezh ennañ an elektronenn

h = kendalc'henn bPlanck = $6,624 \cdot 10^{-34}$ J.s .


An talmoù jedet evel-se a glot en un doare espar gant skeulluc'h an hidrogen.

Deluniañ a reer evel-henn roudoù stabil un elektronenn, eleze ar barroù a c'hall kaout.

Pa dremen un elektronenn eus ar gwiskad 3 d'ar gwiskad 2, e vez skinet bann h_α an hidrogen. Dre vras pa gouezh un elektronenn war ar gwiskad

2 e vez skinet ur bann eus steudad Balmer. Pa gouezh un elektronenn war ar gwiskad kentañ e vez skinet ur bann eus steudad Lyman, h.a.

Mar gall saveleñnoù Bohr displegañ perzhioù an hidrogen, ne c'hallont ket henn ober avat evit elfennoù all ar Rummadur Trovezhel. Da skouer, talmoù skinoù an helium, jedet evel re an hidrogen, ne glotont ket gant skeulluc'h an helium.



Kemmañ-gwiskad an elektron

6. An Atomenn hag al Loc'honiezh Wagennel pe Loc'honiezh Pement-adel.

E 1923 e tiskouez de Broglie en deus an danvez perzhioù a c'haller displegañ mar stager ouzh ar rannigoù ur wagenn a dalm :

$$\nu = \frac{E}{h}$$

E = gremm ar rannig = mc^2 (atalad Einstein)

h = kendalc'henn bPlanck.

Oc'h astenn atalad an ervoned da wagennoù de Broglie, e sav Schrödinger an atalad a zoug e anv :

$$\Delta\Psi + \frac{8\pi^2m}{h^2}(E - V)\Psi = 0$$

Ψ zo ar gevreizhenn o savelañ ar wagenn stag ouzh ar rannig;

$\Delta\Psi$ zo Laplakian ar gevreizhenn Ψ e ne vern pe reizhiad daveennoù. E reizhiad Descartes :

$$\Delta\Psi = \frac{\partial^2\Psi}{\partial x^2} + \frac{\partial^2\Psi}{\partial y^2} + \frac{\partial^2\Psi}{\partial z^2} \quad (E: \text{gremm ar rannig, } V: \text{barr ar maeziad})$$

Atalad Schrödinger a savel ervoned ar rannig. E-se, bezet ur rannig a dolz m , a dizh v , en ur vaezienn V . Gant atalad Schrödinger e c'haller jediñ kevreizhenn ar wagenn stag outi.

Evel-se eo en deus Heisenberg diskouezet ne c'haller ket anavezout war un dro tizh ha lec'helezh ur rannig en un doare diarvar, - a zezrevellas evel Pennaenn an Arvar. Ne gomzer ket mui zoken eus lec'helezh ur rannig, hogen eus he devezuster. Evit an atomenn ne reer ket mui anv eus elektron o troidellañ en-dro d'an dero'han. Al loc'honiezh wagennel a sell en atomennoù ouzh stadoù gremm resis o rentañ kont eus an eskemmoù gremm etre an danvez hag ar skinoù. Jediñ a c'haller dre-se talmoù ar gwagennoù skinet gant korfoù kentañ ar Rummadur Trovezhel hag e weler

e klot mat an hed-gwagennoù jedet gant skeulluc'h ar c'horfoù-se. Evit ar c'horfoù all n'eus ket bet kavet c'hoazh an tu da ziskoulmañ reizhiadoù rouestlet an ataladoù a lugin savelennoù ha pennonioù al Loc'honiezh Pementadel.

7. An Dero'han.

An dero'han a c'hoarvez eus proton hag eus neutron. Ar brotonenn zo ur rannig vuivec'hiet (bec'h +e, tolz $m_p = 1,672 \cdot 10^{-27}$ kg). An neutronenn zo ur rannig vannvec'hiet (bec'h = 0, tolz $m_n = 1,66 \cdot 10^{-27}$ kg).

Dizoloet e voe an neutron gant Bothe ha Becker e 1930. O vombezennañ berilliom gant rannigoù α e kavjont ur rannig nann ionaus. En hevelep bloavezh e roas Chadwick diskleriadur an anadem dre an atalad-mañ :



(Lod all o doa soñjet e oa aze bannoù γ peogwir ne icnaent ket an aezhenn dour).

+ + + + +
+ + +
+

YEZHADUR

Ronan AR GLEW

AR SUJAÑ E BREZHONEG

TERMENADUR

Kefridi ar Sujañ zo estaolifñ ar youl, ha netra ken. Klotañ a ra gant furmoù en -h- krennvrezhonek aet da -f- er brezhoneg bremañ. (1) Daou sujañ zo e brezhoneg :

1. Ur sujañ kadarn evit ar youl start, ar mennout,
2. Ur sujañ gwan evit ar c'hoant, an hetifñ.

Skouerioù : "Adam hag Eva o doa pec'het. Doue a ro ar pardon. Met goulen a ra ma rafont pinienn" (JEZEGOU). (Rafont zo raint er yezh lennegel).

"Na otreit ket e veskfe an divroad e wad gant hoc'h hini, e savfe e vouezh e bodadegoù ar boblad" (VALLEE).

(1) Renkañ a reer dindan an anv "furmoù en -h-" ar furmoù verb krennvrezhonek a zo en trede gour lies gant an dibennoù -hont ha -hent. E brezhoneg bremañ o deus kemeret ar stumm -font (rannyezhel), ha -fent, a anver ar furmoù e -f-, oc'h ober daou rumm anezho : ar furmoù e -fo hag ar furmoù e -fe.

KENVERIADUR GANT AR SUJAÑ ER YEZHOU INDEZEUROPEK ALL

Pa gefverier ar brezhoneg ouzh yezhoù indezeuropek all evel al latin da skouer, e vez merzet eo krennet tachann ar sujañ en hor yezh-ni. Ar brezhoneg yezh resis a arver dreist-holl an diskleriañ. Duzhpenn, ar brezhoneg yezh eeun a arver kalz an enval pe anv-verb dreist-holl evit eztaolif ar youl peogwir ez eo anat ar ster-se e verb ar bannlavarenn. "Ma fell deoc'h gwalet ho mab" (GIG).

Hogen n'oc'h ket holl latinegourion, gresianegourion, na henindiegourion, hag aessoc'h e vo deomp moarvat ren hor c'heñveriadennoù gant ar galleg.

Rouesoc'h eo an arver eus ar sujañ brezhonek eget ma'z eo hini ar galleg. Hemañ a vez arveret alies evit lec'hiañ an degouezhad; kavet e vez enta en tremened, er bremañ. Hag an arroudoù-mañ e tagas ar brezhoneg an diskleriañ, a zo e gefridi lec'hiañ an "ober".

Skouerioù :

1. Ster ar Peurdremened : "Daoust ma oa bet start ar vuhez en doa renet betek neuze, e oa bet atav ivez dibredex e spered diwer-benn e vara pemdeziek" (YEUN AR GOW).

E galleg e vo troet oa bet dre oùt été (Sujañ peurdremened).

2. Ster an Tremened : "Te eo ar wreg edon o c'hortoz. Goude m'em eus da walet ken alies dre va hufvreoù, ne ouien ket penaos ober evit da dizhout" (VALLEE).

E galleg e vo troet em eus da walet dre je t'aie vué (Sujañ tremened).

3. Ster an Andremened : "Daoust ma ne c'hoarveza ket ur seurt tra gwall alies, e veze koulskoude glav tousegi a-wezhioù" (YEUN AR GOW).

E galleg e vo troet c'hoarveza dre produisit (Sujañ andremened).

4. Ster ar Bremañ : "Ar pevar aviel, daoust ma'z int dishañvel unan doc'h an arall, rak m'en deus pep avielour skrivet e hini hervez ar ouizieg-eh en doa, nen dint neozh nemet un aviel" (OLIEREU).

E galleg e vo troet int dre soient (Sujañ bremañ).

5. Ster an Dazoned : "Dalc'hist e vo da reiñ notennoù puilh, gant ma vo kaset danvez deomp gant hon lennezh gwech-ha-gwech-all" (RONAN HUON).

E galleg e vo troet vo dre soit (Sujañ bremañ).

E pep hini eus ar pemp skouer-mañ eo bet rediet ar brezhoneg dre ar ster da arverañ an Diskleriañ peogwir e oa keloù hepken eus lec'hiañ an "ober".

AR SUJAÑ E BREZHONEG

Gwalet hon eus petra n'eo ket. Gwelomp bremañ petra eo ar Sujañ e brezhoneg. E gefridi zo eztaolif ar youl. Hogen ur youl e vez :

- start, pa vez roet ur gourc'hemenn, pa vez strivet da dizhout ur pal : an den oc'h argadiñ;
- gwan, pa vez c'hoantaet pe hetet hepken, pa vez diarbennet un dra : an den o stoum.

AR SUJAÑ START

Keal ar Sujañ start a vez en islavarennoù degaset gant verboù pe gant stagelloù, splann enno ster ar youl start. Arveret e vez neuze fuzm an "Dazoned"(1).

A.- Verb ar bennlavarenn o vezkañ ar gourc'hemenn, ar bedann start, ar striv.

1. Gourc'hemenn : "Ur gourc'hemenn nevez a roan deoc'h : m'en em garot etrezoc'h" (UGUEN).

2. Ret : "Mar menn unan bennak donet war va lerc'h, ret eo ma em nac'ho, ma toqao e groaz bemdez ha ma'm haulio" (OLIEREU).

3. Ober ma : "Taolit evezh ouzh labour ar vicherourion, grit ma vo sentet pizh ouzh va urzhioù" (ROPARZ HEMON).

4. Pediñ, aspediñ : "Pedomp haq aspedomp hon Aotrou ma vennigo an ti-mañ, ma lakao an dud da bleustriñ war e lezenn santal, m'o diwallo diouzh pep spont" (UGUEN).

5. Kemenn : "Aotrou, kemenn ma'z in d'az kaout war an douz" (MADDEZ GLANN-DOUR).

(1) "Dazoned" a lakaer etre krochedoù evit diskouez mat ez eo ar fuzm a veneger, ha n'eo ket dre ret un arver amzer-da-zont. "Dazoned" zo enta amañ ur skritell, ken-ster da "fuzmoù e -fo".

6. "Mirout na": "Mirit na vo trouz ebet en ti e-pad an noz" (feiz ha Breiz). Ster "mirout na" zo : "ober na", evel ar skouer-mañ : "Grit na vezin ket galoet a vezh ha na veiz ket va enebourion goap ac'hanon" (UGUEN).

Er skouerioù 1, 2, 3, diaraok ez eus neket alioù mat gourc'hemmennoù. Ret a-gzrenn ar verañ ar furm "Dazoned". Er skouerioù 4, 5, ez eus ur badenn start. Ar skouerioù 6 a laka anat ar striv. E pep hini anezho, e c'houlenn mennoz ar youl start arver an "Dazoned".

Merkit ivez, bep tre ez eus mennoz ar youl start, e vez erret an islavar-enn ouzh ar bennlavarenn dre ar stagell ma.

B.- Ar stagell : "evit ma" o verkañ ar youl start war-du ur pal.

1. "Lazhompañ evit ma vo dimp holl e zarvez" (OLIEREU).
2. "Dastumit en tammoù a chom evit na vezint ket kollet" (UGUEN).

A-wezhioù e vez kavet ar stagell "ma" gant ur ster damheñvel ouzh hini "evit ma" : "Sant Mikeal hon difennit e-kreiz ar stourmad ma ne vezimp ket kollet da zeiz ar varn" (UGUEN).

AR SUJAN GWAN

Keal ar Sujañ gwan a vez en islavarenoù degaset gant verboù pe stagelloù n'eus enno nemet ster an hotiñ, ar c'hilistourm ouzh un darvoud rakfalt-aziet. Arveret e vez neuze furm an "Divizoud" (1).

A.- Verb ar bennlavarenn o verkañ ar youl gwan, an hotiñ, an diwall, an doujañ.

1. Fellout. Daou ster zo gant ar ger fellout :

a) unen, orinel, o verkañ an diouer : "Tregont diner hep fellel nikun" (GIB). Pa vez dezhañ ar ster-se en ur bennlavarenn e vez gortozet an islavarenn ur furm e -fe ("Divizoud") degaset gant ar stagell e. "Pehini a fell deoc'h e rofen e frankiz dezhañ" (MADDEZ GLANNDOUR).

(1) "Divizoud" e lekaer etre krochedoù, - evel, uheloc'h, "Dazoned", - evit diskouez mat ez eo ar furm hepken a veneger, hep lakaat e kaoz dre ret neparver divizoud. Lavaret a reer kenkouez : furm e -fe.

b) un eil, nevez, o verkañ ar youl : "Jezuz () nep e ell () pan fell, ho selvel" (GIB) : "Pa fell" a dalvez : pa venn. Pa vez arveret gant ar ster-se en ur bennlavarenn e vez gortozet an islavarenn ur furm e -fo ("Dazoned") degaset gant ar stagell ma. "Petra fell dit ? Setu a fell din, ma ne vo biken talvezet kement-mañ na da Brederi ne din-me" (ABEDZEN).

2. C'hoantaat : "Doue ! C'hwi hoc'h eus c'hoantaat e vo ho mab lakaet e kroaz evidomp" (UGUEN).

3. Kerout : "Grit d'ar re all ar pezh a garfec'h a vefe graet deoc'h c'hwi" (MADDEZ GLANNDOUR).

4. Actren : "Na actreit ket a veskfa an divroad e wad gant hoc'h hini, a savfe e vouezh e bodadegoù ar boblad" (VALLEE).

5. Gouzaviv : "Na c'houzañvit biken a taufe an divroad d'ober e annaz war ho tour" (VALLEE).

Ar pevar verb 2, 3, 4, 5, eo anat enno ar youl gwan, a zegas arver an "Divizoud".

6. Dereout : "Dereat e kav Brederi ma taufe ar gour en deus graet outañ ur seurt gaou da lakaat e gorf rageneb d'e hini (evit an amgann)" (ABEDZEN).

7. Dallezout : "N'on ket dellezek a taufes em zi" (MADDEZ GLANNDOUR).

Er verboù-se, hag er verboù kenster, eo gwan, pe gentoc'h ameeun ar youl; dre-se e vez arveret ar furm e -fe war-larc'h ar stagell a, pa raishoc'h ar stagell ma.

8. Arabat eo : "Arabat eo ez pefe nec'h evit kennebeut a dra" (MILIN).

An drienn verbal "arabat eo" oc'h eztaolliñ an difenn a vez d'hec'h heul an "Divizoud" degaset gant ar stagell a, kentoc'h eget an "Dazoned" gant ar stagell ma, en abeg d'e ster-orin.

9. Diwall : "Gant ar re wan e vez dinerzhet ar ouenn. N'o mirit ket en ho kreiz. Diwallit na vefe diskennidi diwarno en ho touez" (VALLEE).

10. Teural evezh : "Taolit evezh na rafec'h hoc'h oberoù mat dirak an dud evit bozañ gwelet mat ganto" (MADDEZ GLANNDOUR).

Er verboù kenster gant ar re-se (9, 10), en deus ar meiz kement a berzh hag ar youl; arveret e vez ar furm e -fe.

11. Kerout aon : "Aon am aus na deufent ket d'ar gêr" (GIB).

En droienn verbal-se en deus ar meiz-o-rakwelout muioc'h a berzh eget ar youl-o-c'hoantaat. Notomp koulskoude e vez kavet ivez an "Dazoned" en degouezh-se : "Me 'n eus aon na varvin".

B.- Stagelloù o verkañ an doujañ.

An holl stagelloù enno ar ger aon (gant aon na, dre aon na, en aon na) a vez d'o heul ar furmoù e -fe.

"Gouze'h emennit ma vezo diwallet ar bez betek an trade deiz ("Dazoned"), gant aon na zeufe e ziskibien en noz d'e laerezh ("Divizoud")" (KOAT).

POELLADENN

An diskleriañ zo e gefridi merkañ en un doare diogel pe da vare e tagouezh an "ober" : tremened, bremañ, dazoned.

Ar sujañ zo e gefridi merkañ ar youl, start pe gwan.

Er boelladenn da heul e vo ret deoc'h leuniañ an eil bann o kemerout ar verb kinniget deoc'h en trade bann hag o reiñ dezhañ ar fumm a zere ouzh ar ster.

- 1. "Ne venn ket Doue ma | cham
noazh an douar" (HERRIEU).
- 2. " A-raok m'en | en devout
amzer d'ober droug din, e voe diskaret gant un
tenn" (Y. AR GOW).
- 3. " Goulennit digant ar barnar rust m'en | en devout
truez ouzh ar bec'hexion" (UGUEN).
- 4. " Kemenn a ra ma | enaouif (1)
ar bezn keunad ha ma | degas (1)
Tristan eus ar c'hastell" (LANGLEIZ).

(1) Lakait ar verb en tu-gouzañv.

- 5. "War ho koulenn e taolin va rouedoù. Hag e
pakjont un niver bras a besked, ken na | regiñ
ar rouedoù" (UGUEN).
- 6. "Kalz amzer a dromenas e-barzh ma | bezañ
gouest da lakaat va zraod er stad m'edont"
(Y. AR GOW).
- 7. "Sellout a reas e pep korn, hep ober an
disterañ tizouz, ken na | dont
da lakaat e benn etre ar skramm ha kostez ar
siminal" (HEMON).
- 8. "Ra c'hoarvezo gant va enebourien evel gant
er geot a gresk war an toennoù hag a zeu da
zisec'hiñ a-barzh ma | diframmat (1)
- 9. "Taolit evezh ouzh labour ar vicherourien,
grit ma | sentiñ (1)
pizh ouzh va urzhiob" (HEMON).
- 10. "An trivet avielour a zo sant Lukaz. Medisin-
our e voe betek ma | kavout
sant Paol war e hent, ma | distreiñ
d'ar wirionez, ha ma en | heuliañ
(OLIEREU).
- 11. "Arabat en em ziskouez ken am | en devout
gouezet piv int ha petra ez int deuet d'ober
amañ" (Y. AR GOW).
- 12. "E pelec'h e fell dit e | eozañ (1)
ganimp evidout pred ar Pask" (GLANNDOUR).
- 13. "Dallet en deus o daoulagad evit ma ne | gwelout
ket gant o daoulagad, gant aon ma | em zistreiñ
ouzhin ha ma | gwellaat
dezh" (OLIEREU).
- 14. "Grit da Gasio dont, ma | an zav
ar wirionez" (KLERG).

(1) Lakait ar verb en tu-gouzañv.

- 15. "Laka difenn war al listri, evit ma ne mont
den da Vro-Gembre" (ABEOZEN).
- 16. "Na deomp ket da grediñ e c'hellomp chom dont
kroaziet hon divree'h hep labourat ha gedal ma.
Deus d'hor bevañ" (UGUEN).
- 17. "Diverrañ an amzer a rajont, betek ma bezañ
ar mare da vont ouzh taol" (ABEOZEN).
- 18. "Gortozit ma digeriñ
deoc'h" (HEMON).
- 19. "Na varnit ket a-raok ma dont
Doue" (UGUEN).
- 20. "Touseg feal an eost / Palac'h emañ da di-goafiv,
/ ma rentiñ
dit da vizitad ?" (GLANNDOUR).

+++++++
++++++
+++
+

L E N N E G E Z H

E r w a n G W E G E N

ROPARZ HEMON : " An tri Boulomig Kalon aour "

Pep skrivagner zo dezhañ un doare d'en em zero'hel, un arvez lennegel. Korvoet e vez gantañ evel ur vengleuz.
 Roparz Hemon, moarvat o klask stankañ an toulloù ec'hon a zo el lennegezh vrezhonek, en deus skrivet oberennoù a bep seurt, prederiadennoù, barzhonegoù, pezhioù-c'hoari, romantoù, levrioù evit ar vugale, hep kontañ oberennoù a ouiziegezh rik.
 En o zouesk ez eus gant "An Tri Boulomig Kalon Aour" un nouz digunvez, disheñvel e spered diouzh hini ar re all. Ar rese o dije roet da grediñ ez eo R. Hemon troet war du mantrus ar vuhez. E gontadennoù, e bezhioù-c'hoari a daolenn dimp kalz aliesoc'h darvoudoù dilevenez, a-wezhioù dister, diliv, ha tud hakr, c'hwerv o savboentoù, bihan-mezhus o c'hoantoù. Sokjit en aergelc'h "Kleier Eured", pe "An Tan e Ti Karmapreden", pe "Fest al Neue Lart". Gwelout a reomp enno dreist-holl paour kaezh tud izel ha gwan da ober ar mad koulz hag an droug, krignet gant c'hoantegezhioù direizh, gant gwarizi, glac'harioù dilavar, more'hedoù kuzh. Pa ne sellesont ket an euzh, an druez an hini eo. Hag, evit gwir, gant an druez, un druez kizidik, dame'holoet, kuzhet a-drek ur frazemerezh sec'h diseblant ha resis, eo e hañval bezañ bet derenet an aozur d'an oberennoù-se. En o c'hichen ar romantoù evel "Mari-Vorgan" pe "An Aotrou Bimbochet", a weler o vleuniañ enno ampartiz ha kalverezh ar skrivagner, daoust d'o zalvoudegezh, a hañval bezañ estren d'e wir anien. Diwanet int diwar un dezo, ur mennad sevel, ha

neket diwar fromadoù, - e sell da blijout pe da gendrec'hini,
ha neket da reiñ korf d'un trivli.

Ne fell ket din lavarout n'eo ket an hevelep Roparz
Hemon en deus skrivet ha "Mari-Vorgan" hag ar pezhioù-c'hoari,
ar c'hontadennoù hag ar barzhonegoù. Nemet da skrivañ ar re
ziwezhañ e oa bet poulzet gant fromadennoù ha neket gant
amboazioù. E galon domm, e deneridigezh kuzh dindan an arvez
diseblant er re-mañ eo a dreuzweleve.

An deneridigezh-se eo en deus lezet da redek en ur
skrivañ "An Tri Boulomig Kalon Aour", levr evit ar vugale,
hervez e anv.

E spered skiantek, doujus ouzh kravez ar gwirvoud a
zifenne outañ diskouez evel gwir zarvoudoù, evel gwir dudoù,
ar re a zo da dremen amañ. Morse ne gaver er bed tud kalonek,
diwidre, madelezhus, hael, nemet e c'hoarvezfe ganto gwall-
reuzioù didrec'hus, hag e varv'ent en dienez goude bezañ bevet
en dic'hoanag. An droug zo an droug hag an neb a fell dezhañ
bout mat a rank paeañ evit se.

Sed penaos e tleer gwelout ar gwirvoud.

Tudennoù diwir, avat : pompinelloù, merc'hodennoù,
boulomouigoù, ar re-se a c'hell degouezhout ganto darvoudoù
diwirheñvel er vuhez ordinal. Bez' e c'hellont bout madelezhus,
kalonek, gredus, seven ouzh ar merc'hed hag ouzh ar re gozh,
skoazellerion an emzivadeg, hael ha doujus koulskoude d'ar
galloudezhioù, ha, padal, tremen hep bezañ drastet gant un
tonkadur dievezh, em dennañ dizroug eus darvenezioù argollus,
dougen skoazell d'an ezhomdek, bri d'an hini reizh ha kastiz
d'an hini fall, hag, en diwez, degemer ar gopr o deus dellezet.

Sed a zo kinniget dimp gant Roparz Hemon en un doare
mibin, damfentus ha damdener, hag a ziskouez un talbenn all
eus e anien wirion.

Lies stumm ha lies liv eo spered ur skrivagner. Meur a
hini hag a chom sonnet, kropet en e arvez lennegel, a zo
dezhañ tuioù disheñvel kremm, godisus p'en deus diskouezet
bout reuz-prezeger, dic'hoarzh p'en deus diskouezet bout farsus,
hegredik p'en deus diskouezet bout ur pismiger taer; n'eus
nemet lenn o enverennoù evit gwelout; hag ar re a anavez
anezho en o buhez pemdezic'k avat...Pehini eus an talbennoù
kinniget eo ar wirionañ, se zo un afer all. Ar wirionez wir
n'eo ket atav an hini a c'hortozer, ha gwell argemer ez eus
kement a haelded en eil taolenn hag en eben.

Roparz Hemon ma'vije bet ur skrivagner gall pe saoz
en dije dalc'het moarvat d'e arvez lennegel a ziskouez ar
gwellañ pezh a gav dezhañ ez eo e berzhioù anienel dibar.
Nemet, brogarour ha yezhkarour, pa wel an toulloù zo da stoufañ
en hol lennegezh kaezh, n'eo ket evit chom hep klask o stankañ.
Sed an abeg da stummoù nivertus e oberoù.

Savet en deus amañ un danevell ma c'helle lezel da vleun-
iañ enni ur goapezh seder ouzh e hegedoni dezhañ, e garantez
kuzh buzh an dudigoù eun ha kalonek, un hiraezh d'ur vuhez
sioul goulaouet holl gant hufvreoù ur bed diantek kompouezet
an droug ennañ gant madelezh ha habasketed tud zo, digollet ar
glac'harioù gant levezazioù hep gwall. Ar bed-se avat n'eus
anezhañ nemet er faltazi. Ar bed-se eo hini "An Tri Boulomig
Kalon Aour".

Sed perak en deus dibabet da dudennoù merc'hodennoù koad
ha kartoñs : ur morian, soner banjo, anvet Jovin; un houzard,
Fabor, paotr faro ha gwisket kran; Harlikin, paotr ar gomeidienn
italiat, anavezet holl, gant e wiskamant marellet melen ha ruz,
e dog daougornek, hag e vataraz; pep hini gant e demz-apered o
klotañ gant e anv hag e stad.

Eamint o ren ur vuhez pompinell e Ti ar Paotr bihan drouk.
Gwallgasat gant hemañ, lordet, mac'hagnet zoken, gwalleürs int.
Nemet o gwashañ gwalleur eo e kav dezho n'eus ket ezhomm anezho,
n'eus kefridi ebet dezho, peogwir n'int ket karet, goude m'eo
ar garantez o abeg da vezañ. (Daoust hag ez eo an taolioù troad
un testeni a zigarantez ? Daoust hag e ve ar garantez diziouer-
usañ digarez da vezañ ?) Ken reuzedik ez em gavont na plegont
da dec'hout. Dilezel a reont b'baradoz labezet da vont kuit,
da vont forzh pellec'h. Un istor kozh an hini eo, ar patrom
anezhañ, an Odisea gant Uliesses o redek ar morioù, o kantren
ar broioù, a-dreuz korventennoù, peñseoù, strobinoù an
douce. Eveltañ e loc'h an tri c'hanfard er Bed diavaez dianav,
argollus, na c'hell ket bout gwashoc'h eget an hini emaint o
kuitaat. Lezel a reont war al lec'h teir pompinell garantezus,
skeudennoù keuziadus eus pezh a c'hellfe bezañ bet, eus pezh a
c'hellfe marteze dont eh-dro.

Ne reont nemet kuitaat, hag a-walc'h eo da lakaat ardiv-
ink an tonkadur da arc'helet. N'o deus ken d'ober nemet lezel
an darvoudoù da zont d'o c'herc'hat, an dud da bledañ ganto,
an oberoù da c'houlemañ o devri.

Bez' ez eus da gentañ ur prantad a-dremen ma reont anaoud-
egezh gant gwirvoud ar bed-se. Em gavout a reont gant an Heur-

euchin, ostiz goapaer un ostaleri dirapar, hag e geben a wreg. (En ur dremen, merkomp pegen dibaot eo gant hon aozour ar merc'hed koant seder ha sioul a vije ken brav tommheoliañ ouzh o c'hened; kalz aliesoc'h e weler gentañ plac'hed digened, dioad, aet trenk gant kerseñnoù dilavar, pe c'hoazh tasmantoù diziraezus ha dilevenez). Skrapet e vezont goude-se gant razhed, laeron soudardelaet, lous, kriz ha dizamant evel e tere ouzh torfedourion. O emgav kentañ eo gant krizder gourdrourzus ar vuhez pemdezisk, hag an aon a greg enno betek degas keuz dezho d'o baradoz kollet. Ha, dres p'emaint war var da zic'hoanagiñ, sed ma'z int divac'het dre skoazell ur skrilh anaoudek a oa bet gwezhall dleour d'o youl vat. Amañ e weler gopraet ur vad-oberenn; kregiñ a raer gant ar burzhudoù. Degouezhout a reont war-lerc'h se gant un toullad piged, ranelled, skeudennoù adarre eus ar merc'hed borodus, madelezhus hepken dre c'hoant emellout ouzh na sell ket outo, dre c'hoant pouezañ war donkadur ar re all; skouerioù a dud vat. Ret merkañ amañ pegen saourus ha plijus an doare ma vez taolennet al laboused o rendael, o ragachat da geñveriañ o madoù, pegen livus ha biv-idiik.

Drezo koulskoude e teu d'an tri boulomig un ali mat, un ditour. Ur baradoz all zo, unan asur ha kougant, unan diazezet, anavezet ha brudet holl : Ti an Den Mat. (Merkit amañ penaos, da ziskouez o sujidiagezh d'an tonkadur, da youl boudoù holl-c'halloudek, penaos e vez lakaet, ent-ardamezel, penn-lizher-emoù d'an anvioù boutin tudennoù ha lec'hioù 'zo, tud ha lec'hioù nevet). Divizout a reont mont, ha pep hini ha reiñ an dorn dezho. Daveet e vezont d'an dTreizherion (hag amañ e rankan evit pezh a sell ar c'hemmadur ober evel pa vijent Tud), an HOUIDI, hag a gemer anezho war jay war o gouzougoù, d'o dougen betek Ti an Den Mat, goude ur veaj plijus, kentelius ha didrabas.

Hag eno, deut e bed ar gwirvoud faltaziek, e bed ar Re a Oar, warnañ renerion diveizadus hag a lez lezemoù ar Faltazi da embreger el lodenn a zo bet dasparzhet outo, an Noz, neuze e tro o zonkadur en un heuliad darvoudoù diwir, faltazius e-kreiz ar faltazi, ma c'hellont diskouez o ferzhioù mat hag a-benn an diwezh bout derenet ganto da adkavout ar baradoz kollet, ar goanag bet tuet evito.

Da gentañ, gant an Holle'halloudeg e vez pareet o goul-
ioù, nevezet o dilhadoù, kempennet o doare, gwalc'het, livet,
stipet dezho; daskoret e vez da bep hini e venveg arouezel,
e vanjo da Jovin, e sabrenn d'an houzard Pabor hag ur marc'h

da winkal; e dog, e vataras hag e c'hleierigoù da Harlikin. Dellezek int a-c'houde-se da gemer perzh er c'hoari damfentus, damreuzius, mibin ha teneraus a oa o vont en-dro hepto.

Ur rener-c'hoari, Volantin, o c'hemer dre an dorn hag o c'has war al leurenoù, an eil war lerc'h eben, goude bezañ kinniget anezho d'e wreg ha d'e vero'h. Evel-reizh eo ar re-mañ eus gouenn ar pebrennoù fichet hag "evel 'zo dleet". Dre eurvad e vez roet d'an tri c'hanfard digarez da guitaat o amved klenk hag e tifoupont e-kreiz tre gouel kêr ar merc'hodemoù e bed ar c'hoarielloù bev.

Sonadeg zo, kerzhadeg ar bomperion, bal ha dañsoù, ma kav Pabor, ar paotr cheuc'h, an tu da ober al lez d'ur bompinell faro ha dichek eveltañ, da gaout afer ouzh hec'h amorous, hag a-benn an diwezh da ziskouez, eñ hag e saou gomper, o c'hadarn-ded direk un tigr dianket diouzh ur sirk. Perzh a gemeront goude-se en un drajedienn gant c'hoarierion a gav dezho ez eo Harlikin e dad dezhañ a oa ganto o c'hoari an hevelep abadenn kantvedoù' zo. An tri boulomig avat ne ouezont ket emaint o c'hoari hag a gemer da wir ar roll faltazius a c'hoariont e-kreiz an diwir-voud; daveet omp adarre da unan eus mennozioù moumounet gant Roparz Hemon : n'eo ar vuhez nemet ur c'hoariva touellus, pomp-inelloù ennañ, renet gant un aozour holle'halloudek ha diveizadus, o c'hoari hep gouzout dezho ur roll hepster.

War-lerc'h se e savont tabut ha brezel ouzh ur c'hazh kildrouk ha flatrer a glask noazout outo hep gonid ebet evitañ, nemet plijadurezh an droug. Kejañ a reont ouzh ur marc'heg houarn-wisket, kouezhet e noed an doenn, hag en dic'hoanag, dre berzh un Dimezell, kriz he c'halon, hag ur Saradn bras, kreñvoc'h e vrec'h eget e hini. E skoazellañ a reont da habaskaat kalon gris an Dimezell hag adc'honit e vrud.

Goude-se e tihunont eus a rav da vev ur paotr-c'hoariell eus amzer ar Faraoned, hag a gont dezho istor mantrus e vestr, bugel-roue broioù an Nil.

Hag en diwezh e teu dezho keloù eus o zi a-wezhall, eus o Mestr bihan drouk. Roet e vez dezho da c'houzout ez eo hemañ klañv bras hag en arvar da goll e vuhez. Ken e teu dezho, ouzh-penn ar c'heuz d'ar baradoz a-wezhall, m'edo plac'hed koant ouzh o gortoz, ar c'heuz da vout pell diouzh o mestr en ur mare m'en devoa ezhomm outo d'em zibaniañ. Galv an dlead a dregern en o c'halonoù hag e teount en-dro d'o zi.

Neuze petra eo e kavont nemet o mestr yaouank, gloazet e gorf ha gwellaet d'e galon, deut da vezañ ur paotr fur, dindan levezon ar boan, ur paotrig dizrouk, hag en deus ezhomm outo.

Ouzhpenn-se ar pompinelloù koant hag o devoa roet dezho ur c'himiad ken hiraezhus zo eno d'o degemer; lakaat a reont o dorn en o dornigoù hag emañ adarre pep tra en e ratre. Adaozet eo ar baradoz. O gopr o deus bet.

Adkavout a reomp emañ kelennadur c'hwerf ha seder war un dro a dreuzwelev en oberennoù Roparz Hemon : n'eo ar bed met un touellwel, n'eo an dud nemet pompinelloù. N'int mestr na war an darvoudoù na warno o-unan. Meret eo bet ar pri anezho gant doueed diseblant hag a sell outo goude-se oc'h em zibab gant an darvoudoù, en ur vouse'hoarzhia, pe, zo gwashoc'h, hep meizout na merzhout marteze o zrivli.

Rak un daolennadur eus ar vuhez penn-da-benn, dindan neuz ar faltazi eo a zo kinniget dimp.

Kregiñ a ra gant ar c'hanedigezh, disparti an tri boullomig diouzh ur baradoz kloz ha diogel, daoust ha diglok; da heul e teu bloavezhioù bugaleach ar c'henteliañ ma teskont dre skiant-prenet diaesterioù ar vuhez pemdeziek war an hent. Kelennet gant ur mestr e tastumont gouiziegezh, ha goude-se, bleniet gantañ, e c'hoariont o roll e c'hoari ar vuhez leun, e pezh a gav dezho eo ar gwirvoud. Ha graet ganto o zro, korvoet ganto o fershioù mat ha paeet evit o mankoù, e tistroont da c'hoari ar baradoz. Mojenn Adam hag Eva, an Odisea, an Imramoù, an hevelep patron a ya d'o sevel. Ardamezel ha kelennel int. Ma'z int disheñvel eo dre berzh an aozourion, pe hinienn, pe meuriad, pe remziad e vent.

Evelto, Roparz Hemon a gemer digarez diwar an divoud da reiñ dimp un daolenn eus an doare, pe unan eus an doareoù, ma wel ar vuhez hag e from outi. Dimp-ni eo lenn etre al lipennoù.

Ur pezh-c'hoari gantañ, "Meurlarjez" a ziskouez endeo un alberz eus an talbenn. Amañ emañ masklet an tudennoù. Ar gweenn zo warno eo an hini a laka war dresoù pep den ar rediezh kevredigezhel, an darventezioù, ar pilpouserezh d'em azasaat ouzh ur patron divizet gant ar galloudezhioù. Dindan, avat, emañ, kafunet gant al ludu, regez ar vuhez, darev atav da zasorc'hiñ tangwall al levenez.

En "Tri Boullomig" en deus Roparz Hemon dibabet diskouez dimp un daolenn seder, drantik, damfantus, dihegredik neozh (peogwir eo eñ, an aozour, un den, ha neket ur c'hoariell hegredik).

Ha gant petore aked eo bet dilennet gantañ ar gerioù a zere ouzh e vennañ ! N'int nag izel ha poblet, na re hael ha c'hwezhet; un ton zo ganto penn-da-benn o krouiñ ur c'hendon-

ierezh, un aergelc'h skañv ha mistr, heñvel un tammig ouzh hini ar "Commedia del Arte", ma oar pep hini n'eus netra gwir enno nemet marteze, hag a-boan hepken, ar fromadoù a verzh ar amañ hag ahont o tigushat a-daol-trumm hag o steuziañ ken buan all.

Febezh arz evezhius a laka Roparz Hemon da zisplegañ e daolennoù ! Soñjit e kendiviz ar piked, pe en tri Houad o neuñvifi etrezek an Ti gant an tri boullomig a-c'haolliad warno, melezouret e dour ar beure "a-bean distummet o skeudenn gant ar gomp-zenn c'hlob strafuilhet hepken gant teir rouedenn o tigeriñ ingal evel tri aveler..." pe e poltred an Dimezell war ar blasenn kêr da zeiz bal ar bomperion, "koantoc'h ha mistroc'h eget ar re all. He daoulagad a oa glas evel ar glizin, he blev gell troc'het e-giz ur frizilhon war he zal. Ruz-ruz oa he dilhad. Un tog ront oa kludet war gorn kleiz he fenn a-us d'he skouarn. He c'horfenn strizh a oa outi milginoù c'hwezhet e giz daou valoñs. Da vroz he doa ar grinolinenn ledanoc'h eget na oa uhel ha dindan e spurmantet bevenn dantelezh he c'hulotenn o kouezhañ war he daouferm". Pegen pizh ha klok e tiskouez ar plac'h koant, gant pebezh plijadurezh ! Ha ken klok all e tiskouez e dudennoù all. N'eus ket avat ur ger ouzhpenn pezh 'zo ret, n'eus ket unan diezhomm, nag un anv-gwan didalvoud. Ha glanet yezh ! Mar ne bleg ket da arverañ gerioù evel "prest" pa'z eus "darev", pe "dispriz" pa'z eus "dismeg", n'en deus ket aon avat da ober gant gerioù evel "kasketenn" ha "kulotenn" pa oar ez ay ar ger da get war un dro gant an dra.

Dre-se, dre ar furn-se, kevan ha kendalc'h, e vez krouet gantañ, e-maez ar gwirvoud hag e-maez an amzer, ur wirvoudelezh hag ur badelezh kenstur da hini ar vuhez. Aet enno gantañ, netra na vir ouzhimp da grediñ ez eo bev an tudennoù-se, a zo dougerion huñvre beurbadel mab-den : baradoz klok an diantegezh "ma'z eus peoc'h ha levenez, ma vez pep kalon dibreder. Ma vezer laouen a-hed an deiz. Hag a-hed an noz".

+++++++
+++++

I S T O R

M a r i - E l e n M A Z E

A N E M S A V K E N T A Ñ :
" B R U G " " S P E R E D A R V R O "

Un darvoud a-bouez eo bet krouidigezh "Brug" e 1912 a ziwanas diouzh Strollad Broadel Breiz, savet en hevelep mare, ha "Spered ar Vro" e 1902, en istor an emskiant vroadel, da lavarout eo, an anaoudegezh o deus ar Vreizhiz ez int Breizhiz, ur ouenn dibar e-touez ar gouennoù, ur vroad gant he yezh, hec'h istor, he sevenadur. Ret mat d'ar Breizhad emskiantek difenn e ouenn, ar gevredigezh n'hell ket ober hepti. Alese an emsav, ar pezh eo bet hag ar pezh e vo.

Kenel Vreizh hag Orin an Emsav

E-kerz an XIXvet kantved ez eus bet savet labourioù a dalvoudegezh

war ar yezh : Ar Gonideg (Yezhadur)
Kervarker
An Uhel.

war an istor: Pitre-Chevallier
La Borderie.

Da skouer en displegadenn graet gant La Borderie e 1890 e Skol-Veur Roazhon, "Petra eo Breizh", e lec'h ma lennoamp :

"Mar sellomp bremañ dre-vras ouzh Istor Breizh, mar studiomp eus an diavaez e zoareoù a-benn e geñveriañ gant istorioù all heñvel outañ, e weler da gentañ, en deus da zavez unan eus proviñsoù hirañ ha klokañ o buhez bet kousezhet o froud "e-barzh ster veur Istor Frañs."

"Ha perak an dra-se ? Eeun an abeg. Breizh a zo gwelloc'h eget ur proviñs, ur bobl eo, ur genel wirion, ur gevredigezh "diouti hec'h-unan, distag a-grenn e-keñver orin ha dibar-klok "an elfennoù ouzh hec'h ober."

"Sellit ! Hiziv an deiz c'hoazh, goude ur c'hantved a greizennerezh, a beurvanidigezh, e komzer alies c'hoazh el "levrioù, er prezegennoù, eus "Pobl Vreizh", eus "Broad Vrezhon", "o lakaat ar ger-mañ da dalvezout evit an amzer vremañ hep ma "vefe kavet abeg ennañ."

Savet eo bet ar studiadennoù-se en-dro da gevredigezhioù gwan awalc'h ha na voent breizhat nemet dre an anv, hogen, daoust da se ez eus bet lakaet difenn warno gant an impalaer.

Ul liv politikel, ar rannvroelerezh, a oa war "Kevredigezh Vroadus Breiz", savet e 1898, hag "Unvaniezh Arvor" savet e 1911. An hini gentañ a oa eus an tu dehou, an eil eus an tu kleiz. Ne dint ket fall a-grenn, evit an aergelc'h a-du gant Breizh a grouont. Met n'eo ket se a c'helle ober berzh d'an ampoent. Chom a reont er-maez eus kudennoù pemdeziek ar bobl, en abeg da dadelouriezh o emzalc'h.

Ar Vroadelourion

Duchauchix, Camille Le Mercier d'Erm, Doez N. Le Roux, a sav e 1912 "Strollad Broadel Breiz", hag ar wech-mañ ez eo kalz resisoc'h ar pal. En em zistag a reont diouzh ar rannvroelourion, ha daoust dezho ober dalc'hmat gant ar galleg (ar pezh en deus miret outo da c'hallout trec'hiñ, e gwirionez), e venegont poentoù pouezus en o Diskleriadur :

V. "...Bez ez eus c'hoazh un ene breizhat, un dra bennak "a stourm hag a zalc'h e buhez, un dra a zo bet c'hoant d'e "vougañ ha d'e gas da get... an EMSKIANT VROADEL".

VI. "Ne anavezomp nemet ar VANN-VRO n'eus nemeti, Breizh."

VIII. "Sellout a reomp ouzh Breizh nann evel ouzh ur "rann eus Bro-C'hall, met ouzh ur Vro Vamm, gwasket ha muntret "evel Polonia hag Iwerzhon, hag o virout, daoust da se, ur spered "vro, krenn diouti hec'h-unan."

XI. "... Ar pep pouezusañ eus hon goulennoù : distag-krenn "diouzh Bro-C'hall; frankiz da Vro-Vreizh d'en em c'houarn hec'h-unan."

XIII. "Anavezout a reomp ar Brezhoneg nemetken evit hor "yezh vroadel, ha c'hoant hon eus e ve desket, evel yezh vroadel, "war holl zouar Breizh-Izel ha Breizh-Uhel, d'ar vugale, arak "hini all ebet."

Traoù dister a zo ivez, ar pezh a ziskouez n'eo ket fraezh c'hoazh ar mennozioù.

Kenelouriezh ha Boutinouriezh - Krouidigezh "BRUG".

Da heul ar "Strollad Broadel Breiz" e teu "BRUG", a zo bet displeget he mennozioù gant E. Gwezenou (unan eus renerion ar Strollad) e "Antée", doare pennad-digeriñ evit ar gelaouenn. Pal "BRUG" a zo kas ar voutinouriezh e Breizh, o soñjal ez eo an tu da zieubiñ ar Breizhad. Diskouez a ra "BRUG" un anaoudegezh don eus o genvroiz.

"Ar voutinouriezh ne c'houlenn ket start e vefe ur Breizhad "kollet en ur meuriad astud".

"Gwestlañ a ra ar voutinouriezh ar gwir didorrus en deus "degemeret gant e vuhez pep den, pep broad."

Displegañ a ra e wirioù :

"E Breizh ez eus un temz amzer, un temz douar (war c'horre "ha dindan) ma klot ar Breizhad perc'hen ganto. Dezhañ ar gwir "denel da dafva frouezh e beadra."

Met,

"Gwerin Vreizh a zesko bevañ e kenveureiezh gant gwerin "ar pobloù all, hag evel-se e helle ur Breizhad deskiñ bevañ "e-giz breur gant ur Breizhad all."

Diskaret e voe pep tra, daou vloaz goude, gant ar brezel.

Tangi Malemanche ha "SPERED AR VRO".

Gwelloc'h c'hoazh, ha kalz, eo "Spered ar Vro". Krouet eo bet "SPERED AR VRO" e 1903 gant Tangi Malemanche. E brezhoneg penn-da-benn, taer ha broadelour ar mennozioù ganti. Flemmañ a ra ar re war. Ar re a fell dezho mirout ar yezh peogwir

1) e lakaio ar C'hallaoued da zerc'hel soñj eus ar Gelled.
2) ez eo ur yezh kozh, bet komzet gant hon tadoù kozh.

Flemañ a ra difennourion ar "spered kozh, ar gizioù kozh, ar yezh kozh". Ret eo ober gant ar brezhoneg "abalamour d'ar Vrezhoneg, ha dreist-holl d'o bugale en amzer da zont."

Displegañ a ra :

"Ar bobl ne ra forzh ebet eus he giz prezeg. He mirout "a ra dre voaz. Rak ar bobl ne oar ket petra eo ar "superflu".
"Gant ar Vrezhoneg desket, ar re a ro an ton, e vo savetaet "ar yezh. En o galloud emañ Spered ar Vro."

"Spered ar Vro a raio dezhi en em ziskouez dibar e pep "tro, hag o vezañ ma'z eo dibar, ez eo kaer; kreñv ha bras "kement a ra."

"Ar Spered en em zispleg er skridoù, a vag ar skridoù."

Aleze eo ret :

- Stourm evit ar brezhoneg en abeg d'e dalvoudegezh denel.
- Krouiñ evitañ ha drezañ, ur gwir lennegezh,
- Stummañ ur strollad tud desket arak mont d'ar bobl.

Ar pezh a c'hourc'hemenn "Gwalarn" ugent vloaz goude.

Siwazh ne voe nemet teir niverenn eus ar gelaouenn, hag an dra-se peogwir eo en em gavet Malemanche e unan-penn er stourm, o welout ster don ar stourm.

Mantrus eo evit Breizh ne vije ket bet klevet, hag ez eo chomet berr. Ma vije bet tud desket o selaou hag oc'h ober o mad eus ar memmoziou-se d'an ampoent, arak ma voe dieub Iwerzhon, e vije bet disheñvel an traoù bremañ.

++++++
++++++
++++++

KERNEVEG

Goulven PENNAOD

"SYLVESTER HA'N DHRAGON"

§ 1.- Ur yezh predenek eus skourr ar yezhoù keltiek eo ar c'herneveg, evel ar brezhoneg hag ar c'hembraeg. Frammadur ar yezh-se (mouezhiadaoeg, furmaoeg) a lakaas anat evit an holl geltiegourion ez oa o stummañ gant ar brezhoneg ur strollad a anver "meryentpredenek" a eneber evel-se ouzh ar c'hembraeg hag ouzh dilerc'hioù dister an norzembraeg, a reer "kornokpredenek" anezhe. O vezañ ar yezh keltiek tostañ ouzh hon hini, studi aketus ar c'herneveg a c'hell sklerijennañ war meur a graf kudennoù ar brezhoneg.

§ 2.- Ar c'hoshañ testennoù e kerneveg (kerneveg) a c'hoarvez eus anvioù tud strewet amañ hag ahont e buhezioù sent kozh hag en un nebeut enskrivadurioù latin. Diwezhatoc'h e kaver un nebeut episc'heriennoù, anvioù-tud e-barzh un aviel latin, hag ur c'heriaeoeg enni war-dro 1000 ger, anavezet evel Vocabularium Cornicum : eus yezh ar skridoù-se e reer herneveg anezhi (betek 1100 gk.).

Eus an 12^t betek ar 16^t ktvd. eo deut betek enomp ar skridoù kernevek talvoudekañ; graet e vez kerneveg eus ar furm-se eus ar yezh. Setu ur roll berr eus ar skridoù-se :

1. 40 gwerzenn tennet eus un dazc'hoari fentus ("1400);
2. Tri mister anvet Ordinalia : "Orin ar Bed" (OM), "Pasion Krist" (PD), "Dasorc'h Krist" (RD) ("15^t ktvd.);
3. Ur varzhoneg war ar Pasion (MC) ("15^t ktvd.);
4. Buhez Sant Meriadeg (EM) (eilskrivet e 1504).

Diwezhatoc'h ez eus skridoù nebeutoc'h talvoudek en ur yezh displeberet mui-oc'h-mui a reer diskargenneveg anezhi, ar skrid hirañ o vezañ "Krouidigezh ar Bed" (GB) bet skrivet e 1611. E kreiz an 18^t ktvd. e voe skrivet e kerneveg, en ur yezh peurwanaet, pennadoùigoù a gaver ur roll anezhe e IYK 263-64. Bez' e c'haller lavarout ez eas da get ar c'herneveg evel yezh komzet e-tro dibenn an 18^t ktvd.

E dibenn an 19^t ktvd. met war-lerc'h 1920 dreist-holl ez eus bet klasket gant brogarourion gernevat kalonek adober gant heñ yezh o bro: Reichet ha skouerlekaet e voe an-doare-skrivañ gant R. Morton Nance, dre e ziazezañ, dre vras, war ar stummoù a gaver e krenngerneveg, e Buhez Sant Meriader pergen. Eus ar yezh nevesaet-se e vez graet nevezkerneveg.

§ 3.- Amañ da heul e vezo kavet ur pennad tennet eus BM, lakaet er skrivaderezh skouerlekaet a-vremañ. Evit diskoez ar c'hemmoù degaset gant Morton Nance e roer amañ da heul ar gw. 3896-3903 evel m'o c'haver en dornskrid orin. Islinennet eo bet ar berradurioù.

Me yv arluth heb parov
duk inweth astronomyer
the helghya heb feladov
the prince par del yv dufer
moys me a vyn 3900
ha geneff cowethe da
an epscop purguir a thues
the certen plas er ov fyn

§ 4.- Ordinale de vita sancti Meriadoci episcopi et Confessoris a voe skrivet e 1504, diwar un dornskrid un tammig koshoc'h war a hañval, gant ur paotr a oa anvet Hadton, pe Rad(ulphus) Ton. C'hoarvout a ra eus 4568 gwerzenn. Rouestlet meurbet eo ar pezh-c'hoari-se :

1°-Meryasek, mab d'un duk a Vreizh anvet Conan a ya da vanac'h e Kerne-Veur, ma vez heskinet gant ur brientin pagan anvet Teudar. Tec'hout a ra da Vreizh ha kavout bod e-lichen Joselin. (1-1152).

2°-Ar c'hoari a ya da Roma hag e klevomp diwar-benn ar pab Sylvester hag an impalaer Costyntyntyn, ur pagan anezhañ a zeu da gristen. (1153-1865).

3°-En-dro da Vreizh. An Aotrou Rohan a fell dezhañ lakaat Meryasek da zistreiñ da vuhez ar bed. Nac'hañ a ra hemañ. (1866-2204).

4°-An duk a Kerne-Veur a stourm ouzh Teudar, o trec'hiñ warmañ. (2205-2512).

5°-E Roma adarre evit klevout embann ar gristeniezh gant Costyntyntyn en holl impalaerezh. Goude e welomp Meryasek dont da eskob Gwened war urzh ar pab Sylvester. (2513-3155).

6°-Burzhudoù Meryasek. (3156-3895).

7°-En Italia, Sylvester a stourm ouzh un aerouant. (3896-4180).

8°-E Breizh adarre. Burzhudoù nevez Meryasek hag e varv. (4181-4568).

§ 5.- Dibabet hon eus ur pennad tennet eus an arroudenn anvet Sylvester ha'n dhragon ("Sylvester hag an aerouant"), dre ma c'hello bezañ studiet diwezhatoc'h gant ar re a fell dezhe deskiñ ar c'herneveg o vezañ m'eo bet embannet e skrivaderezh skouerlekaet gant R. Morton Nance ha A.S.D. Smith, war-dro 1950. Evit an distagadur e taveomp da YBK 2-6.

§ 6.- AR SKRID

Hic Dux, id est, Primus Magnus, pompabit.

My yv arluth hep parov,
Duk, ynweth astronomyer.
Dhe helghya hep felladow,
dhe bryns par del yv devar, 3900
mos my a vyn,
ha geneff cowethe da.
An epscop pur wyr a dhe
dhe certen plas er ow fyn.

Dux, id est, Secundus Magnus.

Bysy yv dhyn bones war,
yma dragon vras hep mar 3905
y'n caf omma rybon-ny :
mara tln-ny ar-hy fyn,
marow on, bras ha byghan.
Da yv bos fur, yredy.

Venator (Ducibus Magis).

Yma omma tûs-arvow
hag archers gans gwaregaw
abel pûr wyr dh'y ladha :
my ny dhowtyaf gans ow hûn
marnas y a vo re lûn
kens es dybarth hy squardya.

3910

3915

(Descendit cum armatoribus)

Hic Episcopus Poli pomeabit.

My yu epscop a dhevys,
ha perlet mûr ow rasow.
Y tedhaws nans yu mys
mones yn hans dhe'n prasow
erbyn Duk Magus a brys,
den fûr yn y worthebow.
Ow crosser, ota parys
lemnyn dhe'm gormynadow ?

3920

Crosser (Episcopi Poli).

My yu parys, arluth da,
saw gwan rawl yma omma
na yllyn lyfya ken mos :
gwak yu dhym an pengasen.
A, mellath Daw y'n gagyn,
scant yu an dewes ha'n bos.

3925

§ 7. - Diskleriadurioù yezhadurel

3896 my, Br. me. Ar raganvioù-gour dieub zo :
Kn. my ty ef hy ny why y (YBK 15)
krBr. me te eh hi ni c'hw i (DBK 19)
yu, Br. eo. Ret eo eveshaat avat ne reer ket gant ar
furm-stagañ, krBr. eo e Kn. Anavezet e oa bet gwezhall dre
ma kaver soweth, Br. siwazh (sl. zoken/ziken).
arluth, g. ls. arlvdyh "aotrou", sl. Kb. arvlwydd.
Ar ger-mañ ne vez ket testeniet e Br. ha disklaer eo e
orin.
hed, Br. hœp, Kb. heb.
parow "kevatal", sl. Br. par. An dibenn a c'hallfe
bezañ, marteze, an hini a gaver en anvioù-tud Br. -ou. An
droienn hep parow a gaver c'hoazh en OM 236 : dh'agan Arluth

hep parow "d'hon Aotrou hep e bar".3897 duk, Br. duk. Eus ar Gl. e teu ar ger-mañ, dre hanter-
erezh ar krSz. evit ar Kn.

ynweth, Br. ivez, krBr. ivez, ovez /'ewed/, eus en
+ govez "stumm". Notit e vez kaletet ar gensonenn
/a/ pa zeu da zibenn-ger e Kn., eleze /e/. E krBr.
diforc'h e chome /a/ diouzh /e/ e dibenn ur ger.
astronymer, g. astronymers. Al liester en -a a ziskouez
ur ger saoznek.

3898 dhe, Br. da (araogenn).

helghya "hemolc'hiañ". War a hañval, ar ger brezhonek a
ve evit *em-holo'hiañ : skouerioù all ez eus eus treuz-
lakadur an /h/ evel-henn adalek mare an henvrezhoneg
hag en teir yezh predenek, sk.: hBr. hoiarn, hKn. hoern,
hKb. haiarn; Br. houarn, Kn. horn, Kb. haearn, eus
*isarno- > *iharna. Merzhout ivez e vez dibennet an
av. gant ur sonenn, ar friadur o vezañ aet da get evel
e BrL. bremañ.
falladow g. "mank", sl. fylllel, Br. fellout, krBr. fellel;
fall "fazi, diouer".

3899 prvns g. prvncys "brientin". Kemmadur blot war-lerc'h
dhe "da". Setu taolenn ar c'hennadurioù blot (YBK 7):

p	t	c	k	gu	ch	b	d	g	gw	go	gr	m
b	d	g	gw	j	v	dh	ø	w	wo	wr	v	

del "evel ma", heuliet dalc'hmat gant ur verb. Kemmadur-
ioù blot. Ar ger-mañ a gaver e Br. delwenn, Kb. delw-
devar g. "dever". Distaget e veze /'dever/, an /s/ o
vezañ skrivet a alies hervez boaz ar Sz.

3900 mos, mones, Br. mon(e)t, Kb. mvned, mvnd. War-dro an
11th ktvd. an /d/ dibenn-ger a yeas da /z/ e Kn.,
skrivet g. Sk. BrKb. tad, hKn. tat, Kn. tas; Br. bout,
Kb. bod, Kn. bos; Br. koed, Kb. oed, Kn. oos, h.a.
a, Br.Kb. g, raganv-stagañ arveret alies evel rannig-verb.
Kemmadurioù blot. Heñvel eo an arver anezhañ en teir
yezh predenek.
myr br. 3.un. myrnes, Br. mennout, Kb. myrnu. Teurel
evezh ouzh an ereadurezh.
3901 ha, Br. ha, hep kemmadur; Kb. a gant kemmadurioù-c'hwezh.
renef, 1.un. gans, Br. gant, Kb. gan. Displegadur :

Kn. gensf genes ganso gensv genen genough gansa (YBK 41)
krBr. genen genet gantañ ganti genemo genac'h gantè (DBK 123)

cowetha g. as. evit *cowetheth arveret evel liester coweth
"kile", sl. Kb. cywaith.
da ag. "mat", sl. Br. Kb. da. E Kn., evel e Br. (ha neket e
Kb.) e vez kemmadurioù blot war-lerc'h an anvioù-tud gourel,
met amañ cowetha n'eo ket ul liester gwirion.

3902 an, Br. an. Disheñvel eo orin ar ger-mell Kb. V, VI. War e
lerc'h e reer kemmadurioù blot gant an anvioù kadarn benel
unan ha gant an anvioù-tud gourel lies. Ne gaver ket avat
ar c'hommadur-c'hwez /k/:/x/. Evel e krBr. Hon eus an
dirak an holl gensonnoù : ur broïenn ouzhpenn eus nevez-
ded ar Br. an.

esecob g. esecobov, Br. eskob, Kb. esgob. Merzhit an diforc'h-
ioù etre Br.Kn. ha Kb.: 1° /sk/:/sg/; 2° kaletadur ar
gensonenn zibenn-ger :: miridigezh ar gensonenn heglev,
eleze /E/ (skrivet Kn. e, Br. h) :: /b/. (Sl. DBK 2).

pur Br. peur, heuliet gant kem. blot. Amañ hon eus skrivet
u evit aroueziañ /u/, met e nKn. e skriver u war un dro
evit /u/ ha /u/.

gwir ag. Br. gwir, Kb. gwir. Ne vez ket arveret ar skrivad i
e nKn. An arouez y a c'hell talvoud neuze /i/ pe /i/. Dre
vras, evit Kn. y = /i/, hon eus Br.Kb. i, hag evit Kn. /i/
hon eus Br. e, Kb. i.

de, br. 3.un. dos, donec, devoe, devones, Br. dont, Kb. dyfod.
Gwelout a reer ez eo bet levezonet stumm an ex. gant hini
moe evel e Br.; devoe zo da vezañ keñveriet evit ar stumm
ouz K. dyfod, Br. devout. Ar bremanel a vez peurliesañ
e Kn. evel e Kb. ster un amzer-da-zont dezhañ. Setu displeg-
adur an amzer-se :

Kn. dof duth de dun deugh dons
krBr. deuñ deuz deu *deuomp deuet deuont (unvouzhiadennet : /d/-/)
(sl. YBK 34, DBK 78).

3903 certain /'ce:tan/ "divizet, sur", diwar ar Sz.; merzhit ivez
lec'h an ag. dirak an ak. evel e Sz.

plas g. -ow, Br. plas, krBr. plac.
er ow fvn "dirazon"; an araogen erbyn, sl. Br. en arbenn da,
a vez displeget evel-mañ : er ow fvn, er dha byn, er v byn,
er hy fvn, er agán pvn, er agas fvn, er aga-fvn. Talvoud a

ra peurliesañ "a-dal, a-enep".

3904 byrv ag. "talvoudek, ret"; eus ar Sz. busv; an ag.-mañ
a dal "emellet, prederiet gant", met, gant ar verb
bos e ster a dal Br. "ret, dav, pouezus". Ur frazenn
damheñvel a gaver FD 999 : byrv vu dheugh bones war.
dhyn 1.la. eus dha. Setu an displegatur :

Kn. dhvm dhvs dhodho dhedhv dhvn dheugh dhedha (YBK 41)

krBr. diñ dit dezañ dezi dimp dic'h deze (DBK 123)

Kn. dhvm zo, evit gwir, ur berradur eus *dhvf-mv.

bones, bos, Br. bout, Kb. bod. Levezonet gant mones
"monet" eo bet av. bos, ac'han ar stumm bones.

war ag. "evezhiek". Ur verb diglok eo evit gwir : war,
waryeugh "bez, bezit war evezh".

3905 yma, Br. emañ, krBr. ema, Kb. yma. Evel e krBr. hag e
Br.E. ne gaver ar furm-mañ met en 3.un. hag an 3.la. :
ymons, krBr. emaint.

dragon b. -as "aerouant". Merzhit n'eus ket a c'her-
mell amstrizh e Kn.; sk. ün dhragon "un aerouant
hepken".

bras ag. Br.Kb. bras.

mar g. Br. mar. Ne vez kavet met en troiennoù hep mar,
hep nep mar.

3906 vn ar. Br. en, e, Kb. vn. Gant ar ger-mell, *vn an a
zeu da y'n, sl. Br. en, er. Strishaet e vez ar ger-
mell ivez war-lerc'h a "a, eus", dhe "da (ar.)",
ha "ha", dre "dre", re "dre (en touadelloù)" : a'n,
dhe'n, ha'n, dre'n, re'n.

caf g. cavyow "kav".

omma "amañ", krBr. ama e-kichen aman.

rvo ar. "e-kichen, tost ouzh". Displegatur : rvo,
rvo, rvo, rvo, rvo, rvo, rvo. Ne
gaver ger kevelep ebet er predenegoù all. Marteze
la. rvo ?

rv, Br. rv. Kadarnast e vez alies an araogennoù hag
ar verboù displeget gant ur ranv-gour : rv, rv, rv.

rv, rv, rv, rv.

3907 mare "mar" heuliet gant kemmadurioù kalet, evel Kn. mar :

b	d	g	fw
p	t	c	qu

(YBK 7)

Dirak ur sonenn, er verboù bos ha mos e reer gant maras, marc, evel mard e Br. (skrivet alies mar d-). Ar furm marc a hañval bezañ evit mar + a (sl. krBr. a, Br. ha damc'houlennata). N'eus diforc'h ster ebet etre mar ha marc. Arveret e vezont gant an holl amzerioù, met ne reer gant an dz. hag'an dv. met pa vez un arvar e spered an hini a gomz, sk. henna marc yu awy "mard eo gwir an'dra-se". Gant a e vez degaset lavarenoù martezeadennel pe zic'hallus, sk. : a quellen. my ny'n gwrissen "mar em bije gwelet, n'em bije ket eñ graet" eme un dall. (Ger-ouzh-ger : "mar gwelfen, n'en rajen ket").

3908 marow, Br. marv, Kb. marw. Distaget /'marou/ gant un divvouezhienn /ou/ heñvel ouzh merk al liester e krBr. (a ranker diforc'hañ diouzh /u/, skrivet ou ar BrL bremañ : tostoc'h e oa ouzh /au/ a glever e BrE ar c'hornog hag e BrK. Ur bommesoniad eo an /o/ amañ. Rouez-tre eo e brezhoneg; menegit a c'haller : kagal evit *karl, kernigell evit *kernigl, ha, marteze, kentel, evit *kentl (?). Paot eo avat e kerneveg e-kichen /r/, /l/, sk. : coref "bier", galow "galv", lyver "levr", ls. livrow, h.a.

on, br. 1.ls. bos. Displegatur :

Kn. of os vu on ouh vns (YBK 30)

krBr. of out eo omp oc'h int (DBK 72)

byghan ag., Br. bihen, Kb. bychan. Distaget e veze /'bi:ən/ adalek ar krKn. evel ma kaver alies /'bi:ən/ e brezhoneg bremañ.

3909 da "dav" : an ag. o talvoud. "mat" eo; hañvalout a ra bezañ arveret ivez gant ster "ret" evel e Br. (m'ea skriver dav neuze).

für, Br. fur. Dont a rafe ar gerioù-mañ eus La. für "laer". vredy "en-wir".

3910 den g. tis, Br. den g. tud. "Meuriad" eo kenster ar ger-mañ. Kb. tud "brc, pobl", ger benel unan, ls. tudoedd, met dyn gb. dynion "den". E krKb. dyn a c'halle bezañ benel, o talvoud "maouez", bremañ avat e vez lavaret dynes evit ar b.

arf g. arvow "arm", Kb. arf. Ar gerioù Kn. ha Kb. a zeu eus al latin arma, ar Br. arm eus ar krGl.

3911 archer, g. -g "gwareger", eus ar krSz. hag an hGl.

gwarak b. gwaregou, Br. gwareg. Distaget e veze en un. /'gwareg/, met al liester ar sonenn bouezmouezhiet a adkave he liv orin : /gwa'regou/.

3912 abel ag. "gouez da", krSz. abył, Sz. able /'eib^ol/ gant ur bommesoniad.

v, Br. g. Setu displegatur ar raganvioù-gour renadenn dirak ur verb ("anvioù-gwan-perc'hennañ") : ow (+ k. c'hwezh), dha (+ k. bl.), v (+ k. blot), hy (+ k. c'hw.), agan (hep k.), agas (hep k.), aga (k. c'hw.).

ladha, krBr. lazañ, Kb. lladd. Bremañ, Br. lazañ, ar zh o tont eus distagatur BrE. [la'hɛp] evit [la | 'ɛp].

3913 ny, Br. ne (ket), + kem. blot.

doutya "kaout aon", eus ar Sz. Displegatur bremañ ur verb : av. cara "karout" :

Kn. caraf kervth car kervn kerouh carons kervt (YBK 29)

krBr. kerañ kerez kar keromp keret keront karer (DBK 71)

ky g. cün, Br. ki g. kon, Kb. ci g. cün. Taolenn ar c'hemm-adurioù-c'hwezh :

c	k	p	t	ou	
h	f	th	wh		(YBK 7)

3914 marnas, mars, mas "anez, nemet", arveret gant an displegatur neppour hepken ha lakaet raktal dirak an anv pe ar raganv. Hep kemmadur.

bo, dz. 3.un. bos. Evel e Kb. e vez arveret an dz. evel un doare-sujañ. Displegatur :

Kn. byf by bo ben baugh bons bedher (YBK 31)

krBr. biziñ bizi bezo-bizimp bihet bizint bezher (DBK 72)

nBr. bin bi bo bimp biot bint bior (YBB 129)

re, Br. re, Kb. rhy, + k. blot.

lün ag., Br. leun, Kb. llawn.

3915 kens, Br. kent, Kb. cynt, derez-uheloc'h huan, a-rack : heuliet e rank bezañ gant stagell an derezioù uheloc'h. es st., berradur eus ages, Br. aget, hBr. haet /aget/. Disheñvel krenn diouzh Br. evit, Kn. awos /'awez/. Displeget e vez es hag ages evel aget e Br.:

Kn. agesof agesos agesoc agesov ageson agesouh agesa
krBr. agedof agedot *agetañ *ageti *agedomp *agedoc'h agete

(Sl. YBK 17, DBK 122).

dybarth b. "kimiad".
sguardya v. "regiñ, dispenn".

3916 a ar. Br. a "eus", lem. blot.
devys "diviñ"; a-dhevys "a-bezh, penn-da-benn".
perlet g. -ys. An -t a ziskouezfe anat, gant n'en goufemp ket ez eo ken kernevek ar ger-mañ hag ez eo brezhonek e geveler prelad.

mür ag., Br. mür, Kb. mawr.

ras g. -ow "gras". Kavout a reer ivez gras g. -ow, met dindan levezon ar rumoù kemmet eur deut da ober gant rag, dreist-holl gant ster "galloud, nerzh, talvoudegezh".

3917 v rv., Br. ez, e. Gwelout a reer e c'haller deraouiñ ur frazenn gent ar rannig-verb-mañ. Kemmadurioù-mesk-kalet :

<u>f</u>	<u>kw</u>	<u>so</u>	<u>er</u>	<u>b</u>	<u>d</u>	<u>m</u>	
h	wh	who	whr	f	t	f	(YBK 9)

dedhew v. "reiñ e c'her". Displegader ar strizhtremened :
gweles, krBr. gwelet.

Kn. gwelva gwelvas gwelas gwelavn gwelascuh gwelons gwelas
krBr. gwelis gwelset gwelas gwelsomp gweloc'h gwelont gwelad

(YBK 29, DBK 71).

nane rannig-verb arveret gant br. hag am. bog evit merkañ an amzeriad abaoe ar gwered. Dianav e Kb. ha Br. : nans vu mys "miz zo". E krBr. na, estr eget an nac'hañ a c'halle bezañ ur stagell kadmaraat. Amañ, dirak amzerioù bog, ez eus -ns evel -(nd) e Br. ; kv. nans vu mys '*nand eo miz', nyms vu "nend eo (ket)".

mys g. -yow, Kb. mis, krBr. mis, Br. mig. Ouzh Kb. a = Kn. a e c'haller goulekaat dalc'hmat krBr. a, skrivet bremañ gant g alies a-walc'h, eleze "ar g a vez distaget en holl deodyezhoù brezhonek".

3918 hane, hone, Br. hont, Kb. hwnt; vn-hans "ahont", vn-hans dhe "en tu all da".

pras g. -ow, Br. pred, eus iLa. pratum. Dianav e Kb.

3920 prve, krBr. pris, Br. priz.

3921 gorthyp g. gorthebow, krKb. gwrtheb "eilger". Ar wrizienn a gaver e hBr. hep, "eme" Ie. *sekW: "diskouez, lavarout".

3922 crosser g. -g "douger bazh-eskob", Sz. cross. Gortoz a rafed *ow hrosser, met ne vez ket graet ar c'hemmadurioù-c'hwez gant an anvioù o kregiñ gant er-, el-.
ota "out-te"; gant ur raganv-gour goudestaget gwan : -ma (-a), -ta, -ya (-a, -e), -hy, -vy, -wy, -y (YBK 15-16).
parve ag. "darec".

3923 lemmyr "bremañ", sl. krKb. llyman, llyma ha marteze krBr. loman.

'm, fura ow war-lerc'h dhe, ha, a. Hep kemmadur.

gorhemmyr g. -ow, Br. gourc'hemenn. E-kichen e kaver an anv deveret gorhemmyrnadow a vez strishaet a-wezhioù, evel amañ, da gormynadow.

3925 saw "met, hogan".

gwan, Br. gwan, a c'hell bezañ lakaet dirak an ak.

rewl b. -ys "urzh, reolenn, kempennadur".

3926 na "en doare ma na", heuliet gant an dz. pe an dv.
gallos v. Br. gallout; displegader an dz. :

Kn. gyllyf gylly gally gyllyn gallouch gallons (YBK 29)

krBr. gilliñ gilli gally gellhomp gellhet gallhont (DBK 68)

lyfya v. krBr. leivañ, Br. leinañ.

ken "kent, a-raok", lakaet raketal dirak furmoù displeget pe nann ar verb : ken of los "a-raok na vezin ('n'on') louet", ken mos "kent mont".

3927 gwak ag. "goullo", sl. Br. gwak.
pengasen b. "teurenn".

3928 a estl. Br. a ! Evel estlammadell ne vez graet kemmadur ebet, met kemmadurioù blot a reer pa vez arveret evel rannig ar vokativ.

mollath b. mollothow, Br. mallozh. Merzhit an /e/ el lies-ter ha gh ar brezhoneg.

dew g. -ow, Br. Doue, krBr. ls. doeou ha neket doused ijinet nevez zo.

kegyn b. -ow, Br. kegin, Kb. cegin, eus iLa. coetna.

3929 scant "rouez".

dewas bg. dewosow, hKn. diet, Br. died, krKb. diawt, Kb. diod.

bos g., hKn. buit, hBr. boet, boit(olion), Br. boued, Kb.
bwvd.

§ 7.- BERRADURIOÙ

DBK : G. PENNAOD, Dornlevr krennvrezhoneg, Kastellin, 1965
IYK : A. EVEN, Istor ar Yezhoù keltiek, Brest, 1956hh.
YBB : F. KERVELLA, Yezhadur bras ar brezhoneg, La Baule, 1947.
YBK : G. PENNAOD, Yezhadur berr ar c'hernevez, Brest, 1960.

Goulven Pennaod

Yacu 12 Eost 1965

F R E D E R O U R I E Z H

L o e i z L E M O I N E

K E A L A N I S T O R E L E Z H

Ar prederour eo an hini sousezhet dirak ar bed merzhet gantañ, sousezhet ivez o verzhout ar bed, sousezhet gant ar sellad ez eo e hini, eleze gant ar brederouriezh. Skrivañ a reas Merleau-Ponty : "An den a zihun hag a gomz eo ar prederour, hag an den zo ennañ en un doare enkuzh ha dilavar diac'hinadoù ar filozofiezh".

Ar c'hudennoù a gomzin diwar o fenn, hep krediñ e roin dezho un diskoulm zo diac'hinadoù ar filozofiezh, ha ma'z eo gwir emañ diac'hinadoù ar filozofiezh en den e-unan, pezh a lavarin a vo komzoù ur c'hemelour selaouet gant kenelourion.

Hegel a skrivas : "Ar filozofiezh, forzh pehini, a vez bepred filozofiezh he mare (...) ar c'hudennoù nemeto a hall bout diskoulmet ganti a vez atav kudennoù he mare". P'hon devo enebet ar brederiadenn-mañ gant mennoz ar "Philosophia perennis et universalis" hon devo tizhet kreiz kudem an istorelezh : an darempred, al liamm a zo etre an amzer hag ar preder.

Ne haller ket degemer unan eus an dachu vennoù-mañ, hini Hegel hag hini ar grennamzer, ha disteurel egile. Hegel a spiseas penaos e vez stag ur preder ouzh e varevezh : ur filozofiezh a zispleg ur marevezh hag a vez displeget gantañ. Evit ar grennamzer ha Leibniz, ar filozofiezh zo treamzerel, trehontia a ra luskadoù an amzer : ne haller enebañ gweladur Hegel ouzh hini ar grennamzer nemet ma soñjer e rank bout enebet amzer ha treamzerel.

Loeiz Lemoine

Skrivañ a reas Merleau-Ponty : "Emañ Hegel diazez ar filozofiezh abaoe ur c'hantved". An orin-mañ ma komz Merleau-Ponty diwar e benn a dal ivez evidomp da stagadenn ouzh Hegel. Ne hallomp ket mui prederiañ evel pa ne vije ket bet eus Hegel, rankout a reomp arverañ e brederouriezh pe da vihanañ dere'hal kont anezhi, hag evidomp, ur mennoz krennamzerel eo hini ar "philosophia perennis et universalis", pa'z eo stag ouzh marevezh ar grennamzer, a vezas anezhañ.

Diskouez a reas Hegel e oa ur filozofiezh ur skeudenn roet deomp gant un amzer, gwelet en deus penaos e vezomp daveet d'ur maread pa studiomp ur filozofiezh. Meizet en deus ar filozofiezh evel troadur ar preder, he luskadoù o vezañ liammet ouzh an amzer dre ur bremañ ouzh o genel evel frouezhusadur un amzer gent. Frouezh un amzer gent eo ar bremañ, hogen ne haller ket lavarout eo tonket ha diogel : "Un heuliad dizalc'h eo ar filozofiezh peogwir ne haller e nep doare anstaet e vez ganet ar filozofiezhou an eil diwar eben dre ur c'herzhad daelal", eme Heidegger.

Hogen an tremened zo ivez frouezh eus ar bremañ : un amgelc'h digor eo an tremened. Mar hon dave ur filozofiezh d'ar mare he ganas, n'emañ ket bac'het ennañ. Dre-se eo moarvat e hallomp komz eus "philosophia perennis" : ar filozofiezh zo trehontus d'an amzer; kompren a reomp Aristoteles, Platon, Sant Tomaz ha Kant ha pa reomp gant ar ger filozofiezh e tarempredomp Heraklites a grouas ar ger "philosophia". Kenbrezeg a reomp gant an Hellasegezh eme Heidegger. Hag amañ, pa gomzomp eus lenn Platon e tirazomp ar gudenn en he c'hreiz. Mar komprenomp Platon, ket moarvat hervez doare e gentañ selaouerion, dre ma'z eus dirazomp ur skramm, un doare moger savet gant ugent pemp kantved a breder hag hon distag dioutañ, ez eo peogwir ar goulennou a voe e re zo ivez hon re pa glaskomp c'hoazh ar respont. "Ne hall ar filozofiezh, eme Hegel, nemet diluziañ kudennoù he mare", hogen kudennoù ar Raksokratid zo ivez kudennoù prederourion hon mare, pe marteze e vefe reishoc'h lavarout e vez ar goulennou goulennou ur marevezh, hogen keal ar goulenn eo a zo padus, ha kentoc'h eget ur respont, ur filozofiezh a vefe un doare dibar da c'houlen.

Hogen, n'eus ur gudenn, avat, nemet pa'z eus ur goulenner. Faziuz e vefe gwelout kudennoù ar filozofiezh evel un doare rollad a dreuzfe istor ha hanez ar filozofiezh digemmus dre ma n'eo ket bet kavet an ateb peurbadus ha tremzerel. N'emañ ket ar filozofiezh o klask an ateb a c'hourfenna tabutoù ar filozofierion : ur prederour a vez meur ken dre ar goulennou ken dre ar

respontou a zo e re. Ma vije goulennou o-unan o treuziañ istor ar filozofiezh ne vijemp dedennet nemet gant filozofierion hor mare a vije doare "troerion" keal ar goulenn. Hogen ar preder hag ar filozofiezhou tremenet a sell ouzhimp c'hoazh : Kant n'eo ket aet dreist da Descartes, Hegel kennebeut ne "lazhas" ket filozofiezh Kant, pezh ne gomprenas ket marteze, rak, tu zo d'en em c'houlen e sigur saver ar "Fenomenologiezh" hag-eñ ne gredas ket, en ur emouezañ ouzh emroadur ar preder en e zont, mont dreist d'e hanvoud, hag-eñ ne veskas ket emskiant an dont gant an disoc'h, hag-eñ ne gredas ket e oa eñ ar filozofier diwezhañ, eleze, hag-eñ n'en deus ket dasore'het mennoz ar "philosophia perennis et universalis".

"Hegel en divezh a gomprenas pep tra nemet e amzezelezh, hag ar genaoc kinniget deomp gantañ n'eo ket ur genaoc wirion, dres peogwir n'eus anezhi nemet kenaoz un hinienn hag ur mare", a skrive Merleau-Ponty.

Lavaret em eus bremaik e vefe va c'homzoù komzoù ur c'hentelour selaouet gant kenelourion : ne vo talvoudus va c'hentel nemet ma klaskan petra dal evidomp-ni an istorelezh ha petore lec'h eo hon hini en istor ar brederouriezh. Evit se em eus soñjet e vefe mat komz un tammig eus al lavar, ha ne dec ket hepken peogwir ez eo al lavar unan eus pouezusañ kudennoù ar brederouriezh, met ivez peogwir e vezomp, ni kenelourion, tonket da gejañ outi dizahan, en hor stourm.

Al lavar zo liamm. Liamm etre an dud, etre an den hag ar bed, e emved, dre ma'z eo al lavar diskleriañ merzhout ar bed. Ar merzhout zo savelañ ar bed; al lavar hon ere ouzh ar bed, evel ar merzhout.

Hogen, daoust ha klotañ a ra ar ger gant ar preder, daoust ha n'eus diforc'h ebet etre ar mennoz hag ar ger a reer gantañ evit e zisplegañ ?

"En droidigezh, e vez ar preder displeget dre ijin ur yezh all, ha dre-se e vez bepred treuzfurmet. Frouezhus avat, e hall bezañ hevelep treuzfurmidigezh, rak lakaat a ra un tu nevez eus diazezoù ar gudenn da anadiañ" eme Heidegger en e studiaden : "Was ist Metaphysik ?" Petra dal ar frazenn-mañ ? Da gentañ ; ar mennoz a hall tremen eus ur yezh d'eben; trehontus d'al lavar eo ar preder. Met ivez, ar preder a zegemer ur sklerijenn nevez a-drugarez da ijin ar yezh na troer enni ur mennoz, ha dre "ijin ar yezh" e ranker kompren preder stag ouzh ar ger.

An droidigezh a vo evidomp un doare da anavezout. Da anavezout, evel-reizh, ar filozofiezh, hogen ivez, hor yezh a zo anezhi hor "benveg prederiañ", dre an troidigezhioù e vo gwelet

Skrivañ a reas Merleau-Ponty : "Emañ Hegel diazez ar filozofiezh abaoe ur c'hantved". An orin-mañ ma komz Merleau-Ponty diwar e benn a dal ivez evidomp da stagadenn ouzh Hegel. Ne hallomp ket mui prederiañ evel pa ne vije ket bet eus Hegel, hallomp ket mui prederiañ evel pa ne vije ket bet eus Hegel, rankout a reomp arverañ e brederouriezh pe da vihanañ dere'hel kont anezhi, hag evidomp, ur mennoz krennamzerel eo hini ar "philosophia perennis et universalis", pa'z eo stag ouzh marevezh ar grennamzer, a vezas anezhañ.

Diskouez a reas Hegel e oa ur filozofiezh ur skeudenn roet deomp gant un amzer, gwelet en deus penaos e vezomp daveet d'ur maread pa studiomp ur filozofiezh. Meizet en deus ar filozofiezh evel troadur ar preder, he luskadoù o vezañ liammet ouzh an amzer dre ur bremañ ouzh o genel evel frouezhusadur un amzer gent.

Frouezh un amzer gent eo ar bremañ, hogen ne haller ket lavarout eo tonket ha diogel : "Un heuliad dizalc'h eo ar filozofiezh peogwir ne haller e nep doare anataat e vez ganet ar filozofiezhoù an eil diwar eben dre ur c'herzhad daelal", eme Heidegger.

Hogen an tremened zo ivez frouezh eus ar bremañ : un amgelc'h digor eo an tremened. Mar hon dave ur filozofiezh d'ar mare he ganas, n'emañ ket bac'het ennañ. Dre-se eo moarvat e hallomp komz eus "philosophia perennis" : ar filozofiezh zo trehontus d'an amzer; kompren a reomp Aristoteles, Platon, Sant Tomaz ha Kant ha pe reomp gant ar ger filozofiezh e tarempredomp Heraklites a grouas ar ger "philosophia". Kenbrezeg a reomp gant an Hellasegezh eme Heidegger. Hag amañ, pa gomzomp eus lenn Platon e tirazomp ar gudenn en he c'hreiz. Mar komprenomp Platon, ket moarvat hervez doare e gentañ selaouerion, dre ma'z eus dirazomp ur skramm, un doare moger savet gant ugent pemp kantved a breder hag hon distag dioutañ, ez eo peogwir ar goulennoù a voe e re zo ivez hon re pa glaskomp c'hoazh ar respont. "Ne hall ar filozofiezh, eme Hegel, nemet diluziañ kudennoù he mare", hogen kudennoù ar Raksokratel zo ivez kudennoù prederourion hon mare, pe marteze e vefe reishoc'h lavarout e vez ar goulennoù goulennoù ur marevezh, hogen keal ar goulenn eo a zo padus, ha kentoc'h eget ur respont, ur filozofiezh a vefe un doare dibar da c'houlenn.

Hogen, n'eus ur gudenn, avat, nemet pa'z eus ur goulenner. Faziuz e vefe gwelout kudennoù ar filozofiezh evel un doare rollad a dreuzfe istor ha hanez ar filozofiezh digemmus dre ma n'eo ket bet kavet an ateb peurbadus ha treamzerel. N'emañ ket ar filozofiezh o klask an ateb a c'hourfenna tabutoù ar filozofierion : ur prederour a vez meur ken dre ar goulennoù ken dre ar

respontoù a zo e re. Ma vije goulennoù o-unan o treuziñ istor ar filozofiezh ne vijemp dedennet nemet gant filozofierion hor mare a vije doare "troerion" keal ar goulenn. Hogen ar preder hag ar filozofiezhoù tremenet a sell ouzhimp c'hoazh : Kant n'eo ket aet dreist da Descartes, Hegel kennebeut ne "lazhas" ket filozofiezh Kant, pezh ne gomprenas ket marteze, rak, tu zo d'en em c'houlenn e sigur saver ar "Fenomenologiezh" hag-eñ ne gredas ket, en ur emouezañ ouzh emdroadur ar preder en e zont, mont dreist d'e hanvoud, hag-eñ ne veskas ket emskiant an dont gant an disoc'h, hag-eñ ne gredas ket e oa eñ ar filozofierion diwezhañ, eleze, hag-eñ n'en deus ket dasorc'het mennoz ar "philosophia perennis et universalis".

"Hegel en diwezhañ a gomprenas pep tra nemet e amzeriezh, hag ar genaoc'h kinniget deomp gantañ n'eo ket ur genaoc'h wirion, dres peogwir n'eus anezhi nemet kenaoz un hinienn hag ur mare", a skrive Merleau-Ponty.

Lavaret em eus bremañ e vefe va c'homzoù komzoù ur c'hentelour selaouet gant kenelourion : ne vo talvoudus va c'hentel nemet ma klaskan petra dal evidomp-ni an istoriezh ha petere lec'h eo hon hini en istor ar brederouriezh. Evit se en eus soñjet e vefe mat komz un tammig eus al lavar, ha ne dec ket hepken peogwir ez eo al lavar unan eus pouezañ kudennoù ar brederouriezh, met ivez peogwir e vezomp, ni kenelourion, tonket da gejañ outi dizehan, en hor stourm.

Al lavar zo liam. Liam etre an dud, etre an den hag ar bed, e emved, dre ma'z eo al lavar diskleriañ merzhout ar bed. Ar merzhout zo savelañ ar bed; al lavar hon ere ouzh ar bed, evel ar merzhout.

Hogen, daoust ha klotañ a ra ar ger gant ar preder, daoust ha n'eus diforc'h ebet etre ar mennoz hag ar ger a reer gantañ evit e zisplegañ ?

"En droidigezh, e vez ar preder displeget dre ijin ur yezh all, ha dre-se e vez bepred treuzfurmet. Frouezhus avat, e hall bezañ hevelep treuzfurmidigezh, rak lakaat a ra un tu nevez eus diazezoù ar gudenn da anañ eme Heidegger en e studiadem : "Was ist Metaphysik ?" Petra dal ar frazenn-mañ ? Da gentañ : ar mennoz a hall tremen eus ur yezh d'eben; trehontus d'al lavar eo ar preder. Met ivez, ar preder a zegemer ur sklerijenn nevez a-drugarez da ijin ar yezh na troer enni ur mennoz, ha dre "ijin ar yezh" e ranker kompren preder stag ouzh ar ger.

An droidigezh a vo evidomp un doare da anavezout. Da anavezout, evel-reizh, ar filozofiezh, hogen ivez, hor yezh a zo anezhi hor "benveg prederiañ", dre an troidigezhioù e vo gwelet

barregezhioù ar brezhoneg : dizoloet e vo petore "sklerijenn" a vez degaset gantañ d'ar preder.

Evel ma rank un den kejañ ouzh tud evit en em anavezout hag a-benn an diwezh, bezañ, e rank ar yezhoù kejañ ivez evit anataat ar brederouriezh enkuzh a zo enno.

Met ne deo ket se, avat, hon lakaio en istor ar filozofiezh. Marteze hon devo lakaet istor ar filozofiezh "ennomp", hogen, ne vimp enni nemet ent-hanezel.

Komzet em eus eus istorelezh hag eus treamzerelezh; ma haller anavezout ar filozofiezhoù a-drugarez da dreamzerelezh ar filozofiezh, evidomp, ne vimp en istor ar filozofiezh nemet pa vimp en Istor e-unan.

Hor stourm evit Breizh hon laka dija en Istor.

Graet e vez "praxis" eus al liamm etre ar preder hag an ober; ar preder oberiant hag an ober prederiet eo ar "praxis". Hor stourm evit Breizh zo ur "praxis". Didalvoud a-grenn e vefe ur brederouriezh vrezhon a glaskfe nac'hañ pezh a zo bet studiet amañ : an istorelezh. En ur maread a stourm emacomp: hor prederouriezh a vo prederouriezh hor stourm pe ne vo ket anezhi.

+++++
++++
++

LENNEGEZH

Ivona KONAN

K L E R G : " A N E O S T I G - B A I L H "

Raklennadur : F. Elies, Istor Lennegezh Vrezhoneg an Amzer-vremañ.
AL LIAMM, niv. 29-31-32-33.
BARR-HEGL, An dastumad (dreist-holl evit ar pennad da studiañ an niverenn 34).

DARVOUDDU E VUHEZ :

Ganet eo bet an Aotrou Klerg e Flenet (Breizh-Uhel) e 1912. Bet eo war e studi e Skolaj St Charlez e St Brieq, hag e Kloerdi Bras en hevelep kêr. Beleget eo bet e 1936. Da c'houde eo bet anvet da gure e Kemper-Gwezenneg, e-pad pevar bloaz hanter, hag e 1942 e teuas da gure e Plouber. Eno e oa pa glevas keloù eus muntr e berson kozh, an Aotrou Lec'hvien (12-8-44) hag eno e chomas betek ma voe anvet da berson Bulien, e 1952 (miz Gouhere pe e miz Eost) a gredan, e-lec'h m'emañ bepred person.

E OBERDU :

Dindan an anv-pluenn Kloareg ar Menez, e "Studi hag Ober", an deus savet troidigezhioù eus ar Skritur-Sakr : "Lizher Sant Paol d'ar Romaned", e 1941, niv. 15-16, ha "Lizher Sant Paol d'ar C'halated", e 1943, niv. 18.

Diwezhatoc'h e kavimp e oberoù el Liamm, e-lec'h ma sin a-wechoù "Klerg Llydaw" : troidigezhioù diwar ar c'hembraeg gant Kate Roberts, ar gontadenn "Un devezh-hañv" e niv. 22, ur pennad all "O yezh a vironn" e niv. 12, (bepred diwar ar c'hembraeg), hag un troidigezh all diwar ar c'hembraeg kozh : "Kambr Kenzelen" en hevelap niverenn. Troidigezhioù all : "Kontadennoù eus Friz an Hanternoz", e niv. 27 ha "Pemp bloavezh eus Istor Israel e-keñver arboellerezh" e niv. 44.

El Liamm bepred e kavimp avat diwar e zorn, pennadoù e ouiziegezh : "Yezhadur bras ar brezhoneg gant Kervella", e niv. 8, "Arvioù-lec'hioù Breizh-Uhel" e niv. 8, "Krennvrezhoneg Plouber" e niv. 19. Ur pennad kelaouifñ : "Ur weladenn da abati Bodgwenn" e niv. 28.

Div gontadenn hag ur barzhoneg a gaver ivez el Liamm : "Un deiz a viz Mae" e niv. 29, hag "An scetig-bailh" e niv. 31, pennadoù eus an diwezhañ a vezo studiet geneomp amañ bremaik. Hervez F. Elies-Abeczen ez eo levezonet ar skrivagner gant kontadennoù Kate Roberts, ma rae war o zro d'ar pred-se evit al Liamm. Kaer-tre ez int. Ar barzhoneg "Noz Kala-Mae" e niv. 32-33, a zo kaer ivez. Levezonet eo bet an Ao. Klerg gant Pardon Gwerc'hez Gwilicoudet ar Gozh-Yeoded, a vez graet da Gala-Mae.

Kavout a c'heller diwar e bluenn troidigezhioù "Ar Bibl Santel", a-gevret gant an Ao. Floc'h (Maodez Glanndour) : Habakouk e 1955, Aviel Sant Mark e 1958, Aviel Sant Yann e 1954 (embannet gant rumad nevez "Studi Hag Ober".) Diwezhatoc'h embannet gant Barr-Heol : "An Aviel Santel hervez Lukaz" hag "Al Lizheroù Katolik", hep komz eus troidigezhioù a seurt gant "Otello" gant Shakespeare, "Seurez Kerwenan" gant Ronan Kermene ha "Mervez da vevañ" gant Y.F. ar Gow. A-zivout troidigezh "Otello" e lavare Roparz Hemon e niv. 59 ar Bed Keltiek : "Troidigezh an Ao. Klerg a heuilh feal ar skrid saoznek, hogen ar yezh a zo ken bev, ma c'hellfe bezañ displeget war ur c'hoariva, pe c'hoazh skingaset evel m'emañ."

Hogen, e oberenn badus ha talvoudus eo Barr-Heol (44 niverenn anezhi). Evit ar re ac'hanoc'h ne anavezfent ket Barr-Heol e fell din reiñ an nabeut diskleriadurioù da heul.

Ur gelaouenn drimiziek eo, bet moulet an niverenn gentañ anezhi da vare Nedeleg 1953. He c'hefridi kentañ a oa brudañ mennozhioù ar Bleun-Brug en Eskopti Sant Brieg ha Landreger. Fallout a rae neuze d'he zener, evel ma lavar e-unan en eil niverenn : "skignañ mennozhioù nevez a zegaso ar yec'hed er stourmad evit hon Bro. Rak, ne vo ket degaset ar silvidigezh d'hor yezh ha d'hor spered-bro en ur stourm gant doareoù ha mennozhioù a c'hella bezañ mat bez' ez eus henter kant vloaz". He fal a oa neuze hag a zo bepred : "... chom feal d'e roudenn vroadel ha katolik." (niv. 14). E miz Mezheven 1956 avat ec'h en em zisparti diouzh ar Bleun-Brug hag a paouez da vezañ e gannadig.

Pennadoù an Ao. Klerg emañ o zalvoudegezh pennañ er mennozhioù hag ar yezh implijet gentañ.

Da gentañ penn ez eo ur stourmer, hag o tegemer ar frankiz klok evit e gelaouenn, e kav an tu bepred en e bennadoù-stur, da varn an dud hag an darvoudoù, dreist-holl darvoudoù an Emsav en un doare start hag eun. Fallout a re dezhañ e vefe e gelaouenn un testeni, abalamour, amezañ, da Vretoned an amzer da zont da intent gwella a se pelec'h emañ ha pelec'h n'emañ ket penn Bretoned ar bloavezhioù-mañ. Lavarout a raio c'hoazh : "Ar wirionez ho kraio dishual" (niv. 6-7).

Adalek Gwengolo 1957 dreist-holl ez eo niverus e genlabourerien, e-touez ar skrivagnerien wellañ : Youenn Olier, Maodez Glanndour, R. Broudig, A.J. Raude, Evnig Penn-ar-C'hoad, an Aotrounez P. Bourdelles, A. Ar C'halvez, hag E. Troal, J. Konan, an Ao. Doktor E. Roparz, Benead, Anjela Duval, F. Ker-vental, Per Even, Per Denez ha kalz re all.

E-touez e bennadoù-stur pennañ e c'hellomp menegiñ : E niv. 2 : War-du

ar pal"; 9 : "Ar stern" (a-zivout ar yezh hag ar skolioù); 10, 11, 15 : "Filozofiezh an Emsav kulturel"; 19 : "Selladoù war hor stourm"; 22 : "An emgann evit ar vuhez"; 23 : "Yezhoù"; 26 : "Peadra ar Vro"; 27 : "Mouezh ar Justis"; 34 : "Tan-arvest diwezhañ"; 41 : "E servij hor pobl"; holl levezonet gant stourm an Emsav, hervez ar c'houlz ma oant skrivet.

Ur stumm all e lennegezh a gavomp er gelaouenn-se eo ivez ar c'hontadennoù-pobl. Plijet eo bet a-viskoazh d'an Ao. Klerg ar c'hontadennoù. Bevañ a ra e-touez ar bobl ha destumet en deus kontadennoù dispar. War Varr-Heol ha war Al Liamm ez eus bet moulet anezho. En o zouez "Kaerañ Soaz", kontet gant J. 'n Herri a Gerhued ex C'houero'had (Kozh-Vare'had), ur skouer a lennegezh-pobl, hag "Al Louarn gwenn" ha "Kaoz an Tost bihan", kontet gant Eujen Brigant.

Skrivet en deus ivez kontadennoù. War Varr-Heol e kavimp teir c'hontadennoù-Nedeleg da venegif : "Ar vamm-gozh" e niv. 25; "Huñvreoù ar person kozh" e niv. 28, hag "Ar vogerenn" e niv. 29. Hogen an div dalvoudusañ e-keñver lennegezh (mennozioù dreist-holl) a zo an div am eus meneget uhaloc'h hag a zo bet moulet el Liamm : "Un deiz a viz Mae" hag "An eostig-bailh".

Pennadoù all liesseut a vez kavet er gelaouenn : pennadoù kelaouiñ, pennadoù eus istor ar vro (a-zivout merzherien Vreizh : an Ao. Perrot, an Ao. Lec'hvien, ar vreadour Boschar, h.a.) hag effrenoù. Hir e vefe o envel holl amañ.

E yezh a vez peuzvuiañ sklaer, resis, leun a droioù-lavar c'hwek, ha start. Menegif a romp en deus bevet e-touez ar bobl, e Tregar, e-lec'h m'en deus pinvidikaet ar yezh an deus desket el levrioù. Dre-se ez eo talvoudus he studiañ.

Chozet em eus evit-se arroudoù eus "An eostig-bailh", am eus strollet war baperenn steñsilet a c'hallot heuilh ganin; hag a studian ganeoc'h e-keñver yezh ha mennozioù.

" AN EOSTIG-BAILH "

gant M. Klerg

Abae un nebeut deizioù, dal ma savan diouzh ar beure, e welan ouz en em silañ sioulik-sioulik ha skoemp a-dreuz delioù glas ar wezenn-brun a zo dindan va frenestr, ul labousig bihan koant-koant, ruz-arvelen e lost, ruz arvelen e gof, ha war e benn ur merk gwenn, - ur bailh... Diwar beg ar brek nesañ da voger an ti, e welan anezhañ oc'h ober ul lamm diwar nij : un toull a zo dres dindan va frenestr, hag e kleven labousedigoù munut o krial dousik-dousik dre ma lonkont o zammig bevañs... Warlene e oa bet en toull-se un neizh-golven, hag ar golveni a leze plouz ha foenn o tivilhal a-hed ar vur; er bloaz-mañ avat, labous e lostig ruz a zo dauet a-benn d'ober e neizh, da zozviñ ha da c'horif e vidoù hep gouzout dare din... N'on ket evit miret a santout un dra bennak, em c'hreiz hag a lavar din ez omp al labous aonik-se ha ma, anacoud-egzh a-bell zo... Keer avat, am eus klask, na sav sklerijenn ebet em spared...

An eostig-bailh ! Ewel ul luc'hadenn ez eo tarzhet ar ger-se war va spered, hag en un taol, evel pa vije bet roget ar ouel a vouche va eñvor, e kleven taolioù sklintin ur marzhol panner o skeif war un annev : un den kozh, du e zrem, krog e choug da blegañ un disteraig, met kreñv bepred, o lakaat fultan, evel stered bihan, da strinkañ a bep tu, ha soul taol ma tarc'hav gant e vorzhol, e teu ur roc'hadenn gantañ. Gwelout a ran an den-se oc'h adlakaat an tamm houarn ruz en tan, hag o kregif e lost ar gordann a zo stag ouz ar vegin vras da lakaat an tan da lugernif ha da fraoñval; ha gant e fichell an e zorn kleiz, e talc'h da vaskiñ ar glaou ruz; ha gwech ha gwech all gant ur fichell all paket ar beg anezhi gant un tamm pilhoù, e strink dour en tan... Un dra souezhus e oa evidomp-ni, gwelout ar marichal o sparfañ dour oval-se, ur mister zoken, ken na glevjomp ar respont gant ar skolaer o tiskleriañ deomp perzhioù an traoù dral-se a vez graet anezho hidrogen hag oksigen... Chapel e oa anv ar marichal kozh; met pa veze droug er vugale a stagent ul lost ouz e anv en ur lakaat dibenn ar ger da zassenif divergent ... "Chapel! Chapel! Chapizod!"

An eostig-bailh evidomp - evel al laouennig, ar voc'hruzic, ar golven-garzh (pe rouzezan) - a oa un evn sark; ha biken n'hor bije goullet na kredet hon-unan, na permetet d'ur bugel all ober droug dezhañ...

Ha setu perak e voe ur gwall-abadenn ur wech etre ar gov kozh ha ma. Un eostig-bailh en doa kuzhet e neizh en un toull eus ar voger dres eus da zor ar c'hovall, ha lorc'h e veze enomp o welout anezhañ o vont hag o tont. Ken na glevis un deiz bennak an eostiged bihan an o zoull o krial. Ret e oa din gwelout penaos e oant, un tamm bennak evel ma'z aar da welout ur bugalig

nevez-c'hanet e tiez an dud... Ret e oa lemel ar vein eus an toull evit gwelout. Chapel gozh na oa ket war-dro, a soñje din, hag e kemerer va amzer; pa gouezhes ar paotr warnon, ha me hastañ buan adlakaat ar vein en o lec'h, ober ul lemm d'an traoñ, ha skarzhañ alese fonnusañ ma c'hallen, betekout na vije savet c'hoant d'agile da gregiñ e foñs va bragoù. Antronoz, pe un deiz bennak war-lerc'h, edo ar marichal e toull e zor pa gouezhas ur maen war e benn : laosk em boa lakaat ar vein en o zoull, hag an tad-eostig hag ar vamm-eostig en ur gas boued d'o reoù vihan o doa laoskaet muioc'h c'hoazh er vein, hag en ur nijal kuit d'edo Chapel o tic'henaouiñ e toull dor e c'hovell, o doa graet dezho kouezhañ. Droug spontus a yeas er marichal, hag heñf da dapout e varzhal, ar vein hag ur skeul, hag o stankañ mik an toull. Glac'haret-naet e oan hag en em c'houlennen penaos dibrizoniañ al labousedigoù hag herzel outo a vervel gant an naon. Dal ma voe aet ar paotr kozh d'e lein - ur pennadig brav edo e di dirouz e c'hovell - e tapis ar skeul d'am zro hag e teuis a-benn d'ober un toullig bras a-walc'h d'an tad-eostig ha d'ar vamm-eostig da dremen... Un deiz bennak e tavas al labousedigoù : nijet e oant kuit gant o c'hofig ruz-arvelen, o lostig ruz-arvelen, o c'holier du hag o bailh gwenn war o fenn...

Er beure-mañ en ur zihuniñ em eus graet ur sell dre ar fenestr : delioù glas ar wezenn-brun a grene gant aazhenn flour ar mintin, fraved a bigose an douer en ur park e-kichen, un tad-moualc'h a c'hwitelle e beg ur wezenn, kegined a ragache e-touez ar pin. Mut e oa toullig an eostig-bailh dindan va fenestr. An hudour, ar strobinnellour a oa steuziet gant e diegezhig...

o

Ar gontadennig-se awonet gant yezh Treger, a zo anezhi ur yezh gwiv ha livet brav. E-leizh a varzhoniezh a zo ouzhpenn enni : En hanter kentañ ar pennad ez eo displeget ar verboù dre vras en amzer-vremañ, e-keit ma tispieg deomp ur fed : an eostig-bailh, ul labousig bihan koant-koant, oc'h ober a neizh. En eil hanter e welomp emañ displeget ar verboù dre vras en amzer andremenet, dre m'eo danevellet gantañ un darvoudig degouezhet en e yaouankiz.

Ar yezh :

En em silañ : kerzhout hanter dre guzh.

Skoemp : aonik pe spontik (Treger : ur gazeg spontik : ur gazeg skoemp).
Izeloc'h e traoñ ar bajenn e kavomp : al labous aonik-se.

Ar wezenn-brun : a c'hellfe bezañ lavaret : ar brunenn. Evel ma lavarer un

un avalonn eus ur wezenn aval, hag eus al lec'h an avalanneg.

Ruz-arvelen : (Kervella 876) -Ar- a zo unan eus ar rakgerioù o deus an implij ledenañ; arvelen : o tennañ d'ar malen; c'hoazh : arwenn, arc'hlas.
Gallout a rafemp ivez : azvelen (gant an hevelep ster).

Ur bailh : ur merk gwenn war dal ul leon bennak. Lavarout a raer c'hoazh : ur marc'h-bailh.

Nosañ : (nes a.g.) tost- tostañ. Un anv-gwan an derez-uhel eus an dereziou-doareañ.

Ober ul liamm diwar nij : Stummet gant un araogenn diwar hag un anv nij, a c'hellfe bezañ un araogenn kevrennek, gant implij ur varrennig-stagañ, evel : diwar-bonn, diwar-lein, h.a.

Dres : en ul lec'h resis dindan va fenestr.

Dousik-dousik evel koant-koant : an adlavaredoù-se a ro muioc'h a bouez d'an dapu anv-gwan, evit plijadur ar skrivagner. Muioc'h a denreded ivez.

Golvan : liester: golvaned pe golveni. Amañ anvini (distagadur Treger).

O tivilhal : oc'h istribilhal (oc'h istribilhañ). Un dibenn verb -al- arveret kalz e Treger (o tivilhañ). Hasonoc'h eo ivez.

A-hed ar vuz : mur (liester : murioù) a c'hellor implij e-lec'h moer. Da skouer ex"Vro Gozh" e lavaromp : "tra ma vo moer, 'vel mur 'n he zro,"

O c'horifañ : goriñ vicoù, tommañ vicoù dezho da ziglorañ, da zigeriñ. Lavaret a vez c'hoazh : tomm-goret eo an amzer. Pe d'un dan gant tarzhienn : tomm-goret eo.

Hep gouzout dare din : Hep gouzout tamm ebet din (ne ouzon dare).

Mirout a santout, hag e dibenn ar pennad : Herzel outo a vervel gant an naon.
A implijet e-lec'h da.

Da venegiñ ivez an dro-lavar : ez omp anaoudegezh evit ez en em anavezomp.

Evel ul luc'hadenn ez eo tarzhet ar qer-se war va sperad : Ar skoudenn-mañ a zo un tammig iskis, rak ne darzh ket ul luc'hadenn mat ar c'huzun a zeu war-lerc'h al luc'hadenn.

Un distercig : un tammig.

O lakaat ful-tan : lavaret a vez peurvuiañ ur fulenn-dan, fulenn-tan.
Ful : liester o verkañ ur strollder. Ar fumm-se n'eo implijet nemet e Treger.

Ha seul taol ma tarc'hav : Star kreñvec'h eget skeiñ (Skeiñ gant e holl nerzh). Arver seul amañ e-lec'h pep a zo amañ da verzout dre ma vez graet gantañ alies e Treger en doare-se. (Tarc'hav eus ar verb darc'heouiñ, e trede gour unan an amzer-vremañ).

Ur roc'hadenn : ur c'hrougnadenn.

Ar vein : Ger vein, ur "souflez".

Fichell : benveg de veskañ, da dreññ ar c'hoad, pe ar glaou en tan en ur forn (evit ar gov).

Da veskiñ (implijet e Treger) : an anv-verb reizh a zo : veskañ.

Sparfañ dour : teurel dour gant ar sparf.

Un tammig displijus eo kavout e kreiz ur pennad skrivet ken brav gerioù evel drol, hidrogen hag oksigen (zoken mar deo gerioù etrevroadel peogwir gerioù skiantel).

Ul lost ouzh e anv e-lec'h ul lost d'e anv a zo brezhoneg fall.

Menegif a rin skrivadur laouenanig; evel-se ez eo bet moulet war Al Liamm. N'ouzon hag ur fazi moulevez eo. Koulskoude ez eo ar stumm m'eo distaget.

Ar golvan-garzh pe c'hoazh golvanig ar c'harzh, pe golvan ar c'harzh.

Rouzeqan : pe 'vel e kanaouennoù 'zo an evnig rouz. Hogen n'ouzon ket hag an hevelep evn eo.

Goulet : Distagadur Bro-Dreger c'hoazh. Un diverrañ eus goulennet. Lavarout a raer c'hoazh : "Goul digantañ" e-lec'h "goulenn digantañ". Evel "larout" evit "lavarout".

Ur gallekadur c'hoazh : permetet.

Adkavout a reomp dres.

Lemel : anv-verb evit "lemet". Anv-gwan-verb "lemet", Tregerieg : "d'ilamet". (evit harz da gemmeskañ).

E kemeren : (lañ gour unan an amzer amdremañ) a.v. kemerout.

Ha skarzhañ alese ionnusañ ma c'hellen : skarzhañ alese a zo tec'hel buanañ ma c'helle. Bez ez eo sach e skasoù gantañ. Un dro-lavar tregeriek c'hoazh.

Pa gouezhas ar paotr warnon : Tapout un den e fazi pe oc'h ober un dra bennak, war an taol.

Leosk em boa lekaet ar vein en o zoull : }
Leoskaet muioc'h c'hoazh ar vein : } Distart e oant.

Chapel o tic'henaouiñ : pe o c'henaouegal, da lavarout eo chem da zigeriñ e c'hencu diarak an dud o tremen. (Ar ger ganou e kavomp unnañ).

Droug spontus : droug kenañ.

Stankañ mik : stouvañ da vat.

Ur pennadig brav edo e di digouzh e c'hovell : ur pennad mat a hent.

O c'holier : eus ar galleg, o gouzoug (lavarat e Treger).

o o o

Perzh er pennad-mañ zo ar barzhoniezh hag ar garantez evit an natur (amañ ar vro hag al laboused : un eostig hag e diegezhad) hag evit an dud.

Ha da glozañ ar gentel, ha da reiñ deoc'h da gompren aesoc'h m'annoz ar skrivagner, e roin deoc'h da glevout kement-mañ, skrivet gant Roparz Hemon : "Anaout ar werin a fell dimp dre m'he deus miret an ens hon eus kollet, dre m'eo kalon hor gouenn, kig hor c'hig, epered hor spered. Anaout ar werin a fell dimp dre m'he deus ur gentel evidomp, dre m'eo eno e kavimp marteze sichenn hon arz, hol lennegezh uhelañ; marteze sichenn hor prederouriezh, hor buhez a-bezh."

+++++++
 +++++++
 +++++++
 +

T A O L E N N

	P.
KINNIG	3
KENTNOTENNOU	5
ATOMDURIEZH	
Gwenael MAZE	
"Frann an Atomenn"	9
YEZHADUR	
Ronan AR GLEW	
"Ar Sujañ e Brezhoneg"	21
LENNEGEZH	
Erwan GWEGEN	
"Roparz Hemon : An Tri Boulomig Kalon Acour"...	31
ISTOR	
Mari-Elen MAZE	
"An Emsav Kentañ : Spered ar Vro, Brug".....	39
KERNEVEG	
Goulven PENNADD	
"Sylvester ha'n dhragon"	43
PREDERDURIEZH	
Loeiz LEMOINE	
"Keal an Istorelezh"	55
LENNEGEZH	
Ivona KONAN	
"Klarg : An Eostig-Bailh"	59
